

Fañch an Uhel : Ma horn-bro

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Ha lakaet **-it** e plas **-et** evid eil gour liez an doare-gourhemenn, evid ma vefe êsoh da gompren, nemed pa vez red lakaad **-et** evid ar rim. Greet eo bet ar hemmadur D/Z na oa ket er skridou tregerieg da genta. Ober a ra gand "euz" e-leh "ouz". E-leh an doare-estlamma e "ad" e ra, evel e tregerieg, gand an derez uhella. A-wechou e kemmesk an tregerieg hag al leoneg. Ha viou-koukoug a zo.

Taolenn

Ma dousig koant.

Eur zon den yaouank.

Sonig Kloareg.

Eur zon kloareg.

Dindan ar wezenn faou.

Janedig Marzin.

Ar plah-yaouank dimezet da eun den koz.

Ivonaig.

Ar pried koz.

Pa oan yaouank.

Erwan.

Taolennou ha giziou

Ar mesaer bihan.

En miz Even.

Ar miliner.

Ar zul d'abardaez, er bourk.

Son ar hlasker-bara.

Dorn Doue.

Gizioù koz Breiz-Izel

Ar groaz er bara.

Breiz ha maro al labourer breton.

Ar pardon.

Krampouez Pardon Plouared.

Tiegez Fantig.

An den mezv hag an arched.

Ar vro

Bepred Breizad.

Breizadez on.

Yez on zadou.

D'an Aotrou Augustin David.

D'an Aotrou Théodor Hersart Kermarker.

Klemmgan war varo P. Proux.

Eñvoriou

Ma bro.

War maro ma zad.

Deh hag hirie.

Ar ster vihan.

Diskuizadenn.

War hentchou Breiz-Izel.

Otel vraz ar steredenn en menezioù Arre.
War hentchoù Breiz-Izel.
Keranborn.

Ma dousig koant

Me 'm-eus eun dousig war ma feiz,
Hag a zo kaer evel an deiz,
Evel eun deiz nevez-amzer
Pa zav an heol ha tomm ha sklêr.

Me 'm-eus eun dousig en Treger,
Ha dreist pep tra 'zo din-me ker,
Eun dous koant dreist ar re goantañ :
A-greiz ma halon he haran.

Ma 'm-bije spered ha skiant,
Deskadurez hervez ma hoant,
Me 'rafe eur zonig dezi,
Da ganañ en toull dor he zi.

Med, pa 'm-be kant dorn, kant pluenn,
Evid skriva war baper gwenn,
Nann, biken ne hallfen lared
'Vel ma eo koant, 'vel m'eo karet.

Eun daoulaagd 'zo en he fenn
Sklêrroh 'ged an dour er werenn ;
'Vel diou vouarenn 'n eur pod lêz
Ez e' daoulagad ma mestrez

He zal 'zo eun hanter loar,
Dreist ar houmoul, en noz, pa bar ;
He dioujod a zo diou rozenn ;
'Vel ar mel, he bleo 'zo melen.

Pa ven o vale 'n he heñver,
Ma halonig a vez seder,
Seder 'vel al laouenanig
Hag a gan evel an estig¹.

Euz ar beure hag euz an noz,
Me 'wel he zi, diwar ar roz ;
Ar moped euz he siminal
'Laka ma halon da dridal.

Bep sul, e-pad an overenn,
Ne ran 'med trei distrei ma fenn,
Ma lar ma zad ha ma mamm din :
« Amañ ez om evid pediñ ! »

Pa vin 'barz ma bez, kousket mad,
Ha serret kloz ma daoulagad,
Mar tremen warnon ma dousig

¹ an estig : an eostig.

E lammo c'hoaz ma halonig.

Er baradoz ni 'n em gavo,

Hag eno c'hoaz ni 'n em garo :

Gwir garantez etre daou zen

Gand ar maro ne hell tremen !

D'ar 14 a viz Here 1857.

Eur zon den yaouank

Em godell zo daou avalig,
Daou aval ken ruz, ken koantig !
Me o roje, a galon vad,
D'an neb am harje, ya, timad !

Ya, mar oufen piou am harje,
Raktal dezañ me o roje :
Allaz ! pa n'ouzon piou am har,
'Virin ma avalou, heb mar.

Me a viro ma avalo',
'Leh birviken den n'o gwelo,
Med ma halon a vo trist-mad,
Ha doureg, 'wechou, ma lagad.

Ein deiz, war ar skourr, 'uz d'am fenn,
'Kanas eun evnig evel-henn :
« Selaou, plahig he lagad drant,
Yannig Kerborz 'zo eur paotr koant !

An arhant 'zon 'n e hodellou,
Pa dañs, ker skañv, er pardonioù ;
E vleo melen, glaz e lagad,
Yannig 'vefe eur pried mad.

Marharidig Marzin hen goar :
He zal 'zo 'vel eun hanter loar,
Ruz he dioujod, lagad lirzin,
Diwall euz Marharidig Marzin !

An avalou miret re bell
A deu da weñvi er godell ;
Ar rozenn goz a gouez er fank,
Soñjit en dra-ze, merh yaouank ! »

Evel-se 'kanas an evnig,
A-uz d'am fenn, war ar skourrig,
Ha me a chomas d'hen selaou,
O ! ya, e-pad eun eur², heb gaou.

Me da zistrei neuze d'ar gêr,
Mond d'am gwele, heb lared ger.
E-pad an noz, tamm ne gouskis,
Nemed soñjal en evn na ris.

Antronoz vintin, pa zavis,
Kenta tra, me 'gred, a glevis,
'Oa kleier Plouared o son

² e-pad eun eur : e-pad eun eurvez.

Dre ma oa deiz kaer ar pardon.

Me da wiska ma dillad kaer,
Voulouz, dantelez Landreger,
Dillad nevez oll, penn-da-benn,
Evid moned d'an overenn.

Ha pa zellis em melezour,
En em gavis ha kaer ha flour :
« O ! lest bremañ, Marharidig,
'Med ouzin ne zello Yannig ! »

An heol en oabl a lugerne,
An evnedigou a gane
'N daou du d'an hent, hag ar bleuniou
'Skuille c'hwez-vad war ar hleuniou.

Ma halonig 'lamme em hreiz,
'Vel dindan an heol, da greisteiz,
E weler an oanig bihan
'C'hoari gand e vamm, war al lann.

Neuze, goude ar gousperou,
Pa oa deuet koulz an dañsou,
Yannig a deuas d'am haved,
Ha da zañsal 'n-eus ma fedet.

Kredit, ma halon 'oa laouen,
O voned gantañ d'an dachenn,
On dioujod 'oa ken ruz on-daou,
Ya, ken ruz ha ma avalou.

Ma lavare an dud gand c'hoant :
« O ! Doue, evel ma'z int koant !
Ha dre-oll 'leh ma termenen,
Koz ha yaouank 'zave o fenn.

Setu roet ma daou aval,
La daou aval ruz, en deiz all,
Roet ivez ma halonig
D'am muia-karet, da Yannig.

Sellit, ne welit ket ahann
Ar hog alaouret, dreist al lann,
Ar hog war veg tour Plouared,
Dreist ar Rubezenn o selled ?

Eno ni a vo eureujet,
Eno ni a vo chadennet
Gand chadenn ar briedelez,
Dirag ar zent hag an êlez.

Ar person koz on hristennas
'Dremeno dim ar walenn c'hoaz,
Merk eur garantez na dorro
Etrezom 'med gand ar maro.

'Barz ar vered a Blouared
Ni a vo ivez douaret,
E-touez on zud koz, on zadou ;
Bennoz Doue d'o eneo !

Keranborn, d'an 23 a viz Eost 1860.

Sonig Kloareg

En Lanvelleg, deiz ar pardon,
Eno e kollis ma halon,
Ha ma'z e' deut ma horv d'ar gêr,
Ez e' klañv-fall, ma hoarig ker.

« Ma hoarig, grit ma gwele din,
Ne ouzon pegoulz e savin :
Eur beleg din ivez klasket³,
Ma halon baour a zo rannet. »

« Ma breurig kêz, ma breur karet,
Gand pe boan ez oh kendalhet ?
Nan eus⁴ droug na zeu da yac'haad
Gand youl Doue hag e hras vad. »

« Allaz ! dre re garoud eur plah
Em-eus poan ha glahar a-walh !
O ! ya, Marharid Kernitron
He-deus rannet din ma halon.

'Barz ar pardon pa zegouezis
O Doue ! petra a welis !
Allaz ! an hini a garan
O tañsal gand Gabig Kervran !

Koef dantelez 'oa war he fenn,
Ruz he dioujod, he bleo, melen,
Euz he horvenn bleuniou c'hwez-vad,
Ha skañv he zroad, lemm he lagad.

War he biz kreiz 'oa ma gwalenn,
Hag hi ken mistr ha ken laouen
O ! Doue, evel ma oa koant !
Hag an oll dezi o-doa c'hoant.

E-biou din 'teuas da dremen ;
Hi da ruzia ha trei he fenn.
O ! Doue, pebez kalonad !
Penaoz n'on marvet timad !

Mez se 'hoarvezo a-raog pell,
Ya, ma hoarig, red e' mervel.
N'em-eus ken em horv a galon,
Eno e chomas, er pardon.

O tond d'ar gêr, d'abardaez-noz,
Na pa oan o sevel ar roz,

³ klasket : klaskit.

⁴ Nan eus : n'ez eus

Me o weled eur steredenn
'Oa kaer ha leun a sklêrijenn.

Mez euz an oabl disjennet,
Hag en deñvalijenn kouezet.
Ha me da lavared neuze :
« Merk fall, siwaz ! e' kement-se ! »

« C'hoarig, grit ober eun arched,
Raf, 'benn tri deiz, mervel 'vo red ;
Ha pa vin eet 'barz an douar,
War ma bzez e hadfet, ma hoar,

Bleuniou an hañv, ha ruz ha gwenn,
En-dro d'ar mên-bez, penn-da-benn,
'Vid ma teuio ar merhed koant
D'o hutuill, hag an dud yaouank,

Hag e lavarfont oll 'vel-henn :
« Daoulinom, larom eur bedenn
'Vid an hini 'zo douaret
Amañ, 'vid beza re garet ! »

Keranborn, d'ar 4 a viz Gwengolo 1861.

Eur zon kloareg

Me 'zo eur hloareg yaouank, a barroz Plouared,
Am-eus leusket al levriou, 'vid beza re garet.

Ya, 'vid beza re garet gand eur plahig fur ha koant,
Melezour an oll verhed, ma harantez, ma hoant.

Leusket em-eus al levriou, ha n'em-eus keuz ebed,
Rouanez ar merhed koant 'zo bremañ ma fried.

Jenovefa Lagadeg 'zo ruz he muzellou,
'Vel roz mintin, el liorz, ha ken lemm he sellou !

'Vel an ed dare er park, he bleo a zo melen,
Pa gan ha pa hoarz ouzin, he dent a zo ken gwenn !

Korvet brao eo ma dousig, bale a ra ervad,
He zroad 'zo skañv ha bihan, ha glaz he daoulagad.

Pa vez he dorn em hini, e pardonioù ar vro,
Ouz on gweled o tremen, pep hini a zistro :

« Brava da zaou den yaouank ! » 'lavar yaouank ha koz ;
Meur a hini on gwele c'hoaz, dre e huñv⁵, en noz.

Brava da goantennig, kaerra krouadurez,
Gand he zavañjer seiz glaz, hag he hoof dantelez !

Ha pa vezem o tiviz, on-daou, eun tu bennag,
« Vel rod milin ar Pont-Meur, ma halon 'ree : *tik, tak*.

Gwechall, pa oan er studi ha pell outi dalhet,
Ped gwech an deiz, ma Doue, e teuen da lared :

« O ! me a garfe beza, beza he melezour,
Pe ar feunteun 'leh ma teu da 'n em zelled en dour ;

O ! me a garfe beza, ya, beza ar walenn
A lugern war he biz kreiz, evel eur steredenn ;

O ! me a garfe beza, beza evnig bihan,
'Vid nijal en he bruched, ha 'vid pokad dezañ.

O ! me a garfe beza ar skabell, 'n he hambr wenn,
'Leh, a-raog mond da gousked, 'ra bemnoz he fedenn ! »

Ha bremañ ne houlennan, em fedennou, beb noz,
O ! ma Doue, 'med moned ganti d'ho paradoz !

⁵ dre e huñv : dre huñvreal, pe dre e hun (?)

Keranborn, d'ar 4 a viz Gwengolo 1861.

Dindan ar wezenn faou

'Barz en koajou Gwernahamm a zo eur wezenn faou
He-deus ouspenn tri-hant vloaz, o ! ya, heb lared gaou.

D'ar zul, 'tro an abardaez, dindan ar wezenn goz,
Na da wech, Ivonaig, om chomet beteg noz !

War ar skourr, a-uz d'on fenn, e kane an eostig,
'Kane an eostig bihan, ken flour ha ken koantig !

Ma laavre dre ez on, bremañ m'hen goar ervad,
Diwall ouz ar merhed koant, ar re⁶ 'ro kalonad.

Mez, allaz ! an dud yaouank, 'vid kleved an evned⁷,
O rei deze kuzulou mad, ne reont van ebed.

Neuze me 'zo bet skoet gand eur barrad kleñved,
Hag en-deus war ma gwele 'pad tri miz⁸ ma dalhet.

An deiz kenta ma savis, 'vel ma tomme ma gwad,
Gand heol an Nevez-Amzer, me da vond d'ar hoad.

Ar hoad a oa splann ha sklêr, glaz e oa ar wezenn,
Hag an eostig a gane bepred, flour ha laouen.

Dindan ar wezenn adarre e oa Ivonaig.
Mez, allaz ! en he hichenn 'oa ma mignon Gabig.

Hga a lavare dezi, mar em-eus klevet mad :
« C'hwi a zo plijadurez ma halon, ma lagad,

Me am-eus ti ha parkou, marh ha buoh hag ejenn,
Ha Laouig n'en-deus netra, zoken eur yarig wenn. »

O Doue ! pebez glahar, ha pebez kalonad !
Me 'garfe beza marvet eno neuze timad !

Er zizun ma timezas ma dous Ivonaig,
Em-eus dilezet ma bro, klañv-braz ma halonig.

Me a zo bremañ soudard, 'barz en dalh ar Roue,
Pell euz ma Breiz, en Bro-Hall, deoh oll bennoz Doue,

Bennoz Doue deoh-hu oll, kenvroiz Vreiz-Izel,
Allaz ! me n'ho kwelin mui, amañ 'vo red mervel !

Keranborn, d'an 21 a viz Gwengolo 1861.

⁶ ar re : "pere" er skrid orin.

⁷ an evned : "an eined" er skrid orin. Vi-koukoug pe "ein" ?

⁸ tri miz : tri mizvez.

Janedig Marzin

I

En Plouared a zo merhed
Hag a zo fur ha koant-meurbed,
A labour stard hag a gan gê,
Hag a blij ar pardonieu deze.

Pa oan yaouankig c'hoaz a oad,
'Oant plijadur ma daoulagad,
Oh ober foenn, 'barz ar prajou,
Pe o tañsal er pardonieu.

Unan dreist-oll, Janed Marzin,
Bepred seder, prest da hoarzin,
'Vel rouanez ar yaouankiz,
'Sklêrijenne 'touz he broiz.

'Leh ma veze, al levenez,
Ar c'hoarz, an heol, ar garantez
'Deue ganti, hag hep pedenn
'Oue kanañ eur ganaouenn.

Pa'h ee Janed d'eul leur-nevez,
Pe d'eur pardon da Blounevez,
Neuze, paotred, 'oa hi gwelet ;
Kaerra ma veze kempennet !

Eur hoof dantelez war he fenn,
Eur groazig arhant 'n he herhenn,
Tavañjer hlaz, gouzougenn wenn,
Ha prenet ken stard he horvenn !

Hag hi ken sard ha ken seder,
Ha ken skañv ha ken dibreder !
He dioujod ruz evel ar roz,
Ha moan he horv, da vond em boz.

O Doue ! koanta da blahig
'Oas-te d'ar houlz-se, Janedig !
Ha bepred 'veze war da dro
An oll baotred yaouank a'r vro.

Yannig Run-Rio, paotr ar bleud,
Da heuille dre-oll, 'vel da skeud.
'Vel ma kare Yann Janedig !
Ha Janed ne gase Yannig.

Tad Yann a oa paotr an arhant.
Yannig ouspenn 'oa eur paotr koant,
Med karoud 'ree ar jistr, ar gwin.

Diwallit, Janedig Marzin !

Per ar Moal, mab hoh amezeg,
Paotr stummet mad ha poanier c'hwek,
Ho kar stard, med 'n'e' ket pinvig :
Eur pried mad 'rafe, merhig...

II

Yann ha Janed 'oe dimezet
Gand person koz Plouared.
Setu-int en o ziegez,
Unanet er briedelez.

Abaoe an deiz m'oe eureujet,
Janed Marzin n'am-boa gwelet ;
Kaset 'oe er-mêz he bro ger
Gand he fried, ar miliner.

O tremen war an hent braz, deh,
E welis eur wreg, war he breh
Ganti eur bugel o skrijal,
Ha krog en he broz 'oa daou all.

Ar wreg paour 'oa trist ha kasti',
Liou ar vizer a oa warni,
Digempenn ha louz he dillad,
Ha marv an tan en he lagad.

Pa lavare din heh ano,
Souezet-braz 'chomis eno :
« Penaoz, c'hwi e' ar plah-yaouank ?...
A ! kouezet e' ar roz er fank ! »

Allaz ! prestig ar baourentez
A gasas kuit ar garantez ;
Levenez ha kanaouennou
'Nijas dirag an ezommou.

Tra a-wechall ma oa manet :
Allaz ! Yann ne gar mui Janed,
Janed ivez ne gar mui Yann,
E-leh pokou 've garm ha kann.

Koantiri, siwaz ! aliez
'Zo mammenn a dristidigez :
Soñjit en se, merhed yaouank,
Meur a rozenn a gouez er fank !

Plouared, d'an 21 a viz Ebrel 1864.

Ar plah-yaouank dimezet da eun den koz

Ma malloz 'roan d'an arhant
A roas d'am mamm-me ar c'hoant
D'am gwerza 'vid douar hag aour.
Aalaz ! ha me 'zo ganet paour !

A werzas he merh d'eun den koz,
Ne ra 'med klemm, e-pad an noz,
Eun den koz brevet gand an oad,
Gwenn-kann e vleo, skornet e wad !

Atao e kraoz hag e waskenn,
Gorreg eo 'vel eur velhwedenn,
Ne gomz din 'med euz e arhant,
Morse eur pok d'e wregig koant.

Doeu ! pegen hir 'vez an noz !
'Barz eur gwele, gand eun den koz,
Na ra nemed huanadi,
Ha kraoza ha kana pouill din !

N'am leusk da voned en neh leh,
Atao 'vez grignouz hag en neh,
Ha ma tosta eur paotr d'an ti,
Kerkent e leusk warnañ ar hi.

Ma mamm, evid beza pinvig,
Hoh-eus gwerzet ho merh Naig,
Med gwell 've ganin paourentez,
Ha ganti eun tamm karantez.

Ma hoarig, ro din kuzuillo',
Hag hebdale me o heuillo,
Me a enebo ma den koz,
N'en-devo peuh, na deiz na noz.

Ya, beteg hen kas d'an douar,
Heb foeltr keuz dezañ, na glahar,
Ha gand e aour hag e arhant
Am-bo unan hervez ma hoant.

Keranborn, d'an 22 a viz Ebrel 1864.

Ivonaig

Me 'oar em farroz eur plahig,
(Heh ano 'zo Ivonig),
Eur plahig koant, eur plahig fur,
He gweled 'oa ma flijadur.

En peb leh ma vije honnez,
Merhed koant, 'oa ho rouanez ;
Er marhad koulz hag en iliz,
Nann, biskoaz he far ne welis.

Labour he mamm a ree bemdeiz⁹,
Ha 'vel eun evnig 'uz d'e neiz,
Diouz ar beure beteg an noz,
E kane soniou, gwerziou koz.

Med allaz ! allaz ! ar sparfell,
Mammig paour, dindan da askell,
'Laero eun deiz da evnigou,
Daoust d'az anken ha d'az klemmou !

Ar bleniou livet ar haerra
A vez kutuillet da genta ;
Hag evel-se ar plahig koant
'Zilezo he mamm 'vid he c'hoant.

Koanta den yaouank 'oa er vro,
Er barroz ha teir leo tro-dro,
A oa, heb mar na lared gaou,
Erwanig ar Moal, a Runfaou.

Hennez a oa pinvig ouspenn,
En-devoa saout, kezeg, ohen ;
Hervez ar vrud zoken e dad
A guze, eun tu, eur yalhad.

Ma houlenn, da bardon Sant-Yann,
Ivona da zañsal gantañ :
Ha setu ma koll ar plahig,
Ne oar penaoz, he halonig.

N'eo mui ar verh ken dibreder,
A gane, a oa ken seder,
A laboure, a galon vad,
Lemm ha birvidig he lagad.

Petra 'zo c'hoarvezet ganti,
Pa ne ra 'med huanadi ?
Allaz ! 'n he halon eo skoet,

⁹ bemdeiz : bemdez (evdi ar rim).

An dra 'zo anad da weled.

Eur zul, en kornig ar vered,
Erwanig ganti 'n-eus komzet :
'Vel ma lamme he halonig ;
'Vel oa he lagad birvidig ?

D'abardaez, m'o gwelis o-daou
Du-hont, dindan ar wezenn faou ;
Ma komze ken flour Erwanig,
Hag e ruzie Ivonaig.

An heol ne oa ket c'hoaz kuzet,
A bep tu 'klever an evned
O kana laouen o zoniou,
War ar gwez hag 'barz ar harziou.

Neuze Erwanig a bokas
D'Ivonaig, hag a laras :
« O ! me ho kar hag ho karo,
Ma dous koant, beteg ar maro !

'Vid derhel on-daou tiegez
Ha beva er briedelez,
Ni 'zo bet krouet, ma dousig ;
Selaou 'ta mouez da galonig.

N'az-po tra d'ober 'med lared,
Gourhemenni ha ma hared,
Ya, setu eno, war ma feiz,
Da oll labour, e-pad an deiz.

Ni on-bo kalz a vevelien
En-dro d'on zi, ha mitizien,
D'ober oll ar pezh on-bo c'hoant,
Ha d'on haroud, ma dousig koant.

Pa vo er park ar vederien,
Ha 'barz ar prad ar foennerien,
Ni 'vo en disheol o sellad,
Dindan eur bod glaz azezet ;

Ha gnd bleun balan ha spern-gwenn,
Bleuniou c'hwez-vad, ruz ha melen,
Me 'rey neuze eur garlantez
'Vid kuruni ma harantez. »

Petra 'lare Ivonaig ?
Tra, 'med ruzia ; he halonig
A dride gand al levez,ez,
He fenn a stoue, gand furnez.

Neuze 'kemas Erwanig
Eur pok war dioujod e zousig :
Eur goulm a gane 'uz d'ho fenn,
E-touez an deliou, 'barz ar wenn¹⁰.

Setu-int bremañ unanet
Ha dimezet hag eureujet,
Setu-int en o ziegez,
'Barz ar stad a briedelez.

Doue da skuillo e vennao
War o zi, evel ar gliz-nor,
Ha da roi deze ar furnez,
Gwelloh eged pinvidigez !

Plouared, d'ar 14 viz Gouere 1864.

¹⁰ ar wenn : notenn gand an oberour : ar wezenn (tregerieg).

Ar pried koz

Ma malloz ruz war ar madou,
War ar mammou hg an tadou
Adro pennou ar merhejou !
Evid kemer koz priejou !

Euz an noz, em gwele pa'z an,
'Leh kousked, 'med gouelañ ne ran ;
'Leh kousked, ne ran 'med gouelañ
Gand keuz d'an hini a garan.

Me n' rojen ket ma halon baour
Evid arhant nag evid aour ;
Evid aour nag evid arhant.
Med 'vid netra, d'eur mabig koant.

Allaz ! hag em-eus hi roet
D'eun intañv gand kozni tortet,
D'eun intañv koz hag e vleo gwenn,
Ha ma bleo-me a zo melen.

Dre ali ma mamm ha ma zad,
Ha 'vid beza kempennet mad,
Allaz ! setu-me dimezet
D'eun den tri-ugent vloaz oajet.

Selaouit eun ali, merhed :
Bezeta den yaouank da bried.
Gwell eo karantez leiz an dorn
'Ged aour hag arhant leiz ar forn.

D'an 2 a viz Du 1864.

Pa oan yaouank

Klemmou Renean goz

Gwechall, pa oan yaouank, a driweh vloaz oajet,
Me 'oa plah koant ivez, ha ne veze gwelet
En pardonioù ar vro, matez na pennherez
Ken brao ha me gwisket, na ken skañv dañserez.

Me a gane ken gê eur werz pe eur zonig !
Ma lagad a oa glaz, ha lemm ha birvidig,
Ma dentigou ken gwenn, ha ma bleo ken melon¹¹ !
Eun neized eostigou a gane em halon !

Hag e larent din-me dre o yez, ken koantig,
Beb beure, pa zaven : « Te a zo koant, plahig,
Ha koantiri dre-oll 'blij da lagad an den,
'Vel an heol benniget pa vez, en hañv o ren.

Ouzit e c'hoarz pep tra, en neñv hag en douar,
Ar bleunioù er parkou, ar stered hag al loar
En bolz kaer an neñvou ; war ar skourr, an evned,
Pa dremenez, a lar : *"Deiz mad dit ha yehed !"*

'Vidout n'eus er vuhez poan, preder hag anken,
Kerz 'at, laouen, da hent, ha kan da ganaouenn,
Doue karantezuz a ro dit e vennoz,
Hag ar bed-mañ 'vidout 'zo eur gwir Varadoz ! »

Ya, 'vel-se e kane ar vouezig em halon ;
Ouz he selaou am-boa plijadur hag eston,
Ma soñjen e padje bepred ma yaouankiz
Ha son an evn bihan ! - 'Vel ma oan diaviz !

An durzunell, ar voualh, an eostig, ar piñsin
A gan, e-pad an hañv, dibreder ha lirin ;
Ar parkou a vez leun a hwez-vad, a vleunioù,
Hag an heol benniget a lugern en neñvou.

Mad allaz ! goude 'teu ar goañv kriz, gand e skorn,
Hag ar paour-kêz neuze a hwez en e zaou zorn,
Hag an evnedigou 'vez truez o gweled,
Hag an oll vleunioù kaer, er parkou, 'vez gweñvet.

'Leh an eostig bihan, pe ar goulm 'uz d'an dour,
Ar vran a gan eur hlemm spontuz, diwar ar skourr,
An heol ne lugern mui, an deiz a vez teñval,
Allaz ! hag ar bed oll 'zo troet da fall.

Siwaz ! kalonig paour, ennout ivez ar goañv

¹¹ melon : melen (evid ar rim).

'Zo degouezet, goude amzer-nevez hag hañv ;
Ar bleuniou 'zo gweñvet, tavet e' ar soniou,
Hag ar vran du bremañ 'ra eno he hlemmou !

Yaouankiz, koantiri, - heol, soniou ha bleuniou,
Ha kozni 'zo, siwaz ! tristidigez, kañvou :
Med goude ar maro, teñvalijenn ha noz,
Eun deiz eh azvleunfom, Doue, 'n ho Paradoz !

Melchonneg (Plouared), d'an 22 a vzi Mae 1865.

Erwan

Ma halon 'zo diêz : Frañseza, ma hoarig,
Roit din eun ali, eur gomz vad bremaig.
Ho kweled droug-kontant 'ree din kalz a boan ;
Mez ivez lavar¹² din petra 'rin euz Erwan ?

Gand eur paotrig ken koant, zoken en paourentez,
Me 'gred 'ven evuruz, m'am-be e garantez ;
Aour hag arhant a-leiz 'zo dister da vevañ,
Mar n'am-be da bried ma dousig koant Erwan.

Gabig Kersalaun 'ra din ivez al lez ;
Henez 'zo pinvidig, bepred 'komz a zanvez,
A gezeg, a barkou, pa zeu, goude e goan,
Mez ne zañso biken hennez evel Erwan.

Ma mamm 'lar din dalhmad diwall ouz ar baotred,
Ar re¹³ 'vez, peurvuiañ, o hoapaad ar merhed ;
Koulz e' dezi tevel, war ze me 'zo heb doan.
Piou a gredfe biken an dra-ze euz Erwan ?

Ha ma zad 'lar ivez : « Me a roy dit kant skoed
Mar karez hen leuskel, o !, ya hep keuz ebed. »
Kant skoed a zo arhant ; kement-se n'e' ket moan :
Mez bast ! se n'e' netra, pa zoñjan en Erwan !

Disul, en Lanvelleg, kaerra m'oa ar pardon !
'Vel ma oa kaer an deiz ha laouen ma halon !
Ya, c'hweh dañs-tro a ris, na ranfoeltr skuiz ne oan,
Rag bepred e vezen gand ma dous ker Erwan.

Ma hoarig, ma hoarig, roit eun ali din,
Ha kaerra polezig am-eus dit-te a roin,
Mar larez eur gomz vad 'vid ma lemel a boan,
Mar larez din kemer ma dousig koant Erwan. »

« Ma hoar, me am-eus bet unan ha n'e' ket koant,
Hag e hallan lared n'oa ket hennez ma hoant ;
Bremañ on evuruz gand Yann, 'zo fur ha paour,
Koantiri a dremen, furnez 'zo dreist an aour !

Keranborn, d'an 29 a viz Mae 1864.

¹² lavar : pa gomz ouz he c'hoar e vez kemmesket ganti "te" ha "c'hwi".

¹³ Ar re : "Pere" er skrid orin.

Taolennou ha gizioù

Ar mesaer bihan

Me e' Laouig, Laouig ar mesaer,
Deuz ar maner a zo du-hont, ken kaer,
En-kreiz ar hoad.

Bemdez, bemdez, pa'z a an heol da guzañ,
Dindan ar faou, en ma hoañzez amañ,
'Kanan a galon vad :
Tra la la la ! Tra la la la !

Boud mesaer, eur vicher ar wellañ.
E-pad an hañv, pa vez 'n heol 'uz d'am fenn,
Ha sklêr ha tomm, na pa vez ar gwenan
War ar bleuniou, an ed-du ha spern-gwenn.

Pa vez c'hwez-vad a-leiz dre an hentchou,
Ha bleuniou kaer er parkou, er prajou,
Pa gan an evn, war ar skourr, 'uz d'e neiz,
Pa bar an heol, en oabl, beb deiz, beb deiz.

Med er goañv, allaz !, allaz ! pa vez erh, pa vez skorn,
'Vel am-bez riou d'am zreid ha d'am daou zorn !
Pa ne vez ken na deliou na bleuniou,
'Vel ma ven trist, gand an evnedigou !

O ! er goañv ! Neuze bezit truez,
Bazit truez ouz ar mesaer kêz ;
En amzer-ze, ez e' garv e vuhez,
Rankoud beza 'barz al lanneg er-mêz.

Ya, med Doue 'roy e heol benniget
Dim adarre : bezom oll fur ha mad,
Pedom Doue, ar zent, na behom ket,
Hag e vezo dim pretsig degaset.

Ma mammig paour 'welan o vond d'ar hoad,
Da glask koad seh : diouz ma daoulagad
E strink an dour : en-kreiz kalon ar goañv,
En he zi-plouz, ma mammig kêz hep tan !

O ! ma Doue ! pegoulz e vin-me braz ?
Ar baourentez hag ar gozni da laz !
Med pa vin braz, da vab, o ! mammig paour,
'Hounezin dit kalz a arhant hag a aour.

Aotrou Doue, Gwerhez, ho paradoz
'Rofet dezi : hep klemm, en deiz, en noz,
En peb amzer, he-deus bepred poaniet,
Gand pep seurt droug, allaz ! e' bet gwasket.

Me a vo fur, ha pa vo degouezet
Ma zro ivez da vond diwar ar bed,
Aotrou Doue, 'n he hichenn ma galvit
'N ho paradoz ganti ma hemerit !

D'an 30 a viz Mae 1861.

En miz Even

I

En miz Even, d'ar houlez ma vez braz an tommder,
Da greisteiz, pa ne gan na moualh nag alhweder,
Pa deu ar gudon hlaz d'ar waz, da eva dour,
Pa hourvez en disheol ar zaout war ar yeot flour.

Evel ma oan o vond e-biou eun tiegez,
E ano Kerella, ma zal gleb gand ar c'hwez,
E tegouezis 'n eur prad, 'oa ennañ foennerien
Astennet a-hed korv dre-oll, war ar wrimenn.

En disheol ar hleuniou, o gwelen, kousket mad,
Goude beza troet, da zeha, foenn ar prad :
Ma oant eno mesk-mesk, ha paotred ha merhed,
Ha tro-dro, a bep tu, e kane ar skrilled.

Med en eur horn a'r prad, dindan eur wezenn faou,
Eur hrennard, eur baotrez a oa ivez, o-daou :
Ar re-ze n' gouskent ket, ha diskuiz ha laouen,
E c'hoarzent, e-touz ar bleuniou, ar raden.

Ar paotr 'oa mab an ti, e ano Erwanig,
Penzeg vloaz 'vid oll oad ; e dad a oa pinvig,
Hag eñ 'oa eur paotr koant, lagad glaz, bleo melen,
Hag a ouie kana ken brao eur ganaouenn.

Ar baotrez, penzeg vloaz, 'oa en ti matezig :
Koantig-oll 'oa ivez, heh ano Louizaig ;
Ganti eur vroz berliñj, hag he zreid diarhenn.
Setu 'vel ma komzent o-daou, war ar hlazenn.

D'ar 7 a viz Mae 1864. En eur vond euz bourk Tredrez da Lomikel-an-Trêz.

II

- « Zaig, lak da droad war ma zroad :
- Sell ! eur vent int, 'vel ni¹⁴ en oad.
- Hag on bleo on-daou 'zo melen :
- Ouzit ma hoarig e larfen. »

« Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig,
Tav, goapaer, te 'vad 'lar traou !
Na rez ket goap euz Louizaig ;
E vem-ni breur ha c'hoar on-daou !
Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig ! »

« O ! te 'vad 'zo teo da gov-karr !
Sell, gand 'r vronnenn-mañ¹⁵, ma hoar,

¹⁴ 'vel ni : 'veldom-ni.

¹⁵ gand 'r vronnenn-mañ : ?

O mentad raktal e fell din,
Goude te 'ventay ma hini¹⁶. »

« Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig !
Tav, goapaer, te 'vad 'lar traou,
Hag a ra goap euz Louizaig,
'Ve eur vent on hov-karr on daou !
Chom 'ta, o ! chom 'ta, Erwanig ! »

« Koantig-oll ez out, Louizaig,
Koant 'vel an deiz, ha bremaig
E fell din-me, heb lared gaou,
Ma dousig koant, eur pok pe daou. »

« Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig,
Tav, goapaer, te 'vad 'lar traou !
Ne gredi ket ober se, paotrig,
Rag ma vefem gwelet on-daou...
Chom 'ta, o !, c'hom 'ta, Erwanig ! »

« Fallagr out deut gand da bokou !
War an hent ha 'barz ar parkou,
Pa'z eem d'ar bourk, d'ar hatekiz,
Na da wech dit-te e pokis ! »

« Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig,
Tav goapaer, te 'vad 'lar traou,
Hag a ra goap euz Louizig !
Evid eur pok laeret pe daou...
Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig ! »

« Da ouel Sant-Yann, deiz ar pardon,
Te 'vad a vo kaer, ma halon !
Evid dañsal eun aobadenn,
Me 'yao 'r henta d'az koulenn. »

« Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig !
'Vel ma ouzout liva eur gaou,
Hag ober goap euz Louizig !
E tañsfem er pardon on-daou !...
Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig ! »

« Da ugent vloaz, pa 'm-bo tennet
D'ar billed¹⁷, 'vefom eureujet
Gand ar person on badezas
Ha gand ar gerent on ganas. »

« Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig !
Tav, goapaer, te 'vad 'lar traou,
Hag a ra goap euz Louizig !

¹⁶ ma hini : "ma hini" er skrid orin.

¹⁷ tennet D'ar billed : evid mond da ober e goñje e veze tennet eur billed. Ma oa mad e reed e goñje, ma ne oa ket e chomed er gêr.

E vefem priejou on-daou !...
Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig. »

« Neuze e kouskfom 'n eur gwele,
Hag on-bo on-daou bugale,
A zavfom en doujañs Doue,
Ivez en doujañs ar roue. »

« Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig !
Tav, goapaer, te 'vad 'lar traou,
Hag a ra goap euz Louizig !
On-bo-ni bugale on-daou !...
Ro peuh, ro peuh 'ta, Erwanig. »

« On bugale, kristenien vad,
A zerro dim on daoulagad,
Ha Doue 'barz e varadoz
On lakay gand on zadou koz. »

« Kaerra ma komzez, Erwanig !
O ! me 'garfe ne ve ket gaou
Ar pez 'teus laret bremaig !
Beza er baradoz on-daou,
Erwanig gand e Louizig ! »

« Hag on horvou paour 'vo beziet
En heveleb toull, er vered,
Ha tud ar vro oll a laro :
"Bennoz Doue d'ar re varo !"

« Kaerra ma komzez, Erwanig !
O ! me 'garfe ne ve ket gaou
Ar pez 'teus laret bremaig :
"E kouskfem en eur bez on-daou !
Kaerra ma komzez, Erwanig ! »

Me an dud a zo dihunet,
D'al labour ez e' red moend ;
War-zao ! hag eom da drei foenn,
Bezom kaloneg ha laouen.

Plouared, d'an 13 a viz Mae 1864.

Ar miliner

Me 'zo miliner war an dour,
Hag a gan gê hag a val flour,
Ya, miliner war dour Leger,
Koanta ster 'zo en Bro-Dreger.

Selaouit : *Tik tak ! tik tak tak !*
Mar kanan gê, setu perag.
Bemdez, bemdez, mar gran eur zon,
Mar de' ken laouen ma halon.

Me a laro deoh, mar karit,
Petar 'zo kirieg ; selaouit :
Tik tak tak tak ! Koanta sonig
A gan er giz-se ma dousig !

Adal ar beure, pa zavan,
Beteg an abardaez e kanan ;
Eun all a gan ivez ganin,
A ro an ton hag ar zon din.

Mar deu din eur soñj trist bennag,
Kerkent e klevan : *tik tak tak !*
Hag e nij an dristidigez,
Hag an eostig 'zelaou ma mouez.

'Uz d'am zi 'zo eur wezenn faou,
Plijadur am-bez o selaou
An drask hag ar voualh beg-melen
A gan enni o hanaouenn.

Ma ziegez n'eo ket pinvig :
Ne lojan 'med laouenanig.
Ar richodenn hag ar golvan,
Teir yarig hag eur hazig gwenn.

Ha koulskoude ez on laouen,
Hag a kanan war-bouez ma fenn :
Gwennilied ma chiminal,
Ouz ma hlevoud, ra kemend-all.

'Liez ar paour-kêz pesketaer,
Eet kuit digantañ eun dluz kaer¹⁸,
A lar e ran-me goap outañ,
Pa'm hlev er giz-se o kanañ.

Braoa m'eo beza miliner !
N'ez eus ket a gaerroh micher,
'Vid ober soniou, 'hed an de'

¹⁸ eun dluz kaer : "eun dluzenn gaer", pe meur a hini ?

Hag o kana d'an oll, goude.

Pa deu Janedig d'ar vilin,
Janedig koant, plah Matilin,
Neuze 'sodan, heb lared gaou,
Ma chom beteg an noz d'am zelaou.

O kas, degas ha traoñ ha kreh,
Sahadou bleud, dindan ma beh,
Me 'vez skañv-mad, hag e kanan,
Heb morse paouez na skuizañ.

Ha pa distro ma dous d'ar gêr,
War ar roz 'klevan he mouez sklêr
O klask an ton euz ma zoniou,
Hag e choman pell d'he selaou.

Pa deuiio miz Mae, war e benn
Gantañ eur gurunenn spern-gwenn,
Neuze 'vad 'vo kaer ma milin,
Neuze 'vo koant merh Matilin !

Dre-oll e vo bleuniou c'hwez-vad,
Plijadurez an daoulagad,
Hag an durzunell, ar gudon,
En-dro d'am zi 'gano o zon.

Me 'zesko neuze d'an eostig
Eur zonig koant da Janedig,
'Vid, beb noz, beb noz, hi hano,
Hag ouz he selaou, ne gousko.

Mouez ma milin ha ma hini
'Gano ivez he meuleudi,
Ha war ar roz hag en draonienn,
He ano 'skloko penn-da-benn !

Braoa m'eo beza miliner,
Er vilin dour, war ster Leger,
Kana d'an noz ha d'ar mintin
E zousig koant, merh Matilin !

Ploared, 1864.

Ar zul d'abardaez, er bourk

Peurganet eo ar gousperou
Ha peurlaret ar pedennou :
It bremañ, paotred ha merhed,
C'hoariit, dañsit ha c'hoarzet¹⁹.

Paotred yaouank ha merhed koant,
Kerkent pep hini 'heuill e hoant,
Bugale ivez ha re goz :
C'hoarz ha plijadur beteg noz.

Darn ah a da hoari boulo',
En park Yannig Keravallo :
Belein ar brarrouz, o-zri,
A zo ivez euz ar c'hoari.

Da hoari 'r hillou 'h a darn all,
Darn all, galoch pe mouchig-dall,
Darn all a zañs war ar hlazenn,
Du-hont, dindan ar goz dervenn²⁰.

Dre-oll 'zo trouz ha levenez :
'Val ar balan war ar hleuziou,
En pep kalon, ar garantez
A vleugn hag a ra he neizioù.

Ar biniou hag ar vombard
A zon skiltruz ha ken laouen !
Hag ar yaouankiz a lamm stard :
Jabadao, dañs-tro, aobadenn.

Ar re goz a zell, azezet
En disheol, e-touez ar bleunioù,
Pe war mogerou ar vered,
Hag a zoñj 'n o yaoankizou.

Darn all ivez, a-vagadou,
Du-mañ ha du-hont dastumet,
A gomz a bep seurt labourioù,
Falhad ar foenn, trohañ an ed.

« Penaoz e' da foenn, Alanig ? »
« Ma foennn, mad a-walh, med ma herh
A zo bet gwanet eun tammig,
Ha ma gwiniz a zo war-lerh. »

« Ar galo diweza, 'me Yann-Vraz,
En-deus greet dre-oll kalz a vad,

¹⁹ c'hoarzet : c'hoarzit.

²⁰ ar goz dervenn : an dervenn goz.

D'an heiz, d'ar melchon, d'ar yeot glaz. »
« Larit, 'me Job, d'an oll drevad. »

« En foar diweza Menez-Bre,
Al loened-korn 'oa gwall-glasket,
Ar hezeg 'h a mad adarre,
Ma daou ebeul am-eus gwerzet. »

« Ya, Doue da vezo meulet,
Mar gell kenderhel an amzer,
Ne vezo ket da boan kollet,
Evid ar hloar, paour labourer ! »

Trouz braz 'zo en ostaleri :
Kann 'zo du-hont, hervez ar vrud ;
« Pipi, perag ken braz c'hoari ?
Perag 'n em zastum an dud ? »

« Lein charre-trêz ar Velchonneg
A zo aze, hirie, me 'gred :
Ar Manah braz hag an Taleg
'N em zisput, goude o fred.

Me 'anvez ahann o moueziou,
Pep hini aneze a lar
Ez eo roue ar charreou.
Ha kann a zavo prest, heb mar. »

Med an heol 'zo o vond da guz,
Diskenn a ra a-dreñv ar roz,
Ar hloh a zon an *Angelus*,
Setu o tond ar vrumenn-noz.

En hent 'vid ar gêr, hebdale,
Hag ar re o-deus da vond pell
A hell bremañ, ma feiz, bale,
An heol a zo izel, izel.

Tadou, mammou ne garont ket
Gweled o zud re ziwevad :
En hent 'ta, prim, mar ne garet²¹
Boud tamallet gand mamm ha tad.

Gabig a ambroug e zousig
Renean Rio, e oll c'hoant :
O ! 'vel ma lamm e galonig,
Dindan lagad ar plahig koant !

Bremañ d'an oll 'laran noz-vad,
Hag ar peoh hag huñvreou kaer,

²¹ mar ne garet : mar ne garit.

'Vid galloud, d'al lun, labourad
A galon vad, ha dibreder.

Son ar hlasker-bara

Anvet on ar hlasker-bara
N'e-neus na ti na gwele, netra,
A ranko, e-keid ma vo beo
Bale, bale, 'vel Boudedeo.

'Barz ma dorn ma fenn-baz dero,
E valean dre oll ar vro,
War ma skoaz eur bisah lien,
'Leh ne vez morse bara gwenn.

Dibaot ez an d'ar hêriou braz ;
Ar chas, 'vel ma welont ma baz,
Hag en pillou va oll dillad,
A red warnon 'vel war eur had.

An dud ivez 'zo didruez,
Oll 'laront din : « Koz didalvez ! »
Ma goapaad 'ra meur a hini...
A ! goapaad eur paour 'n e gozni !

War ar mêz emañ an dud vad ;
Eno am-bez ma skudellad,
Ha zoken eun tammig kig-sall,
Eur banne jistr, 'vel ar re all.

Evidon, 'vel evid an oll,
E lugern hag e tomm an heol,
Hag an evned, drant ha lirzin,
A gan 'uz d'am fenn, d'ar mintin.

Mar degouez din kousked er-mêz,
(Vel eo, siwaz ! chañs ar paour-kêz),
A-uz d'am fenn 'vez ar stered
Am diwall euz an droug-spered.

A-wachou, e soñj din gweled
An oabl evidon digoret,
Ha diwar eur goumoulenn aour,
Jezuz-Krist o lared d'ar paour :

« Paour-kêz, echu e' da boaniou,
Deus ganen bremañ d'an neñvou,
E-touez ar zent, ar sentezed,
Ar verzerien, ar brofeted !

Gwisket dit eur zae lien gwenn,
Ha war da dal eur steredenn,
E kani ma meuleudiou,
Beteg diwez an amzeriou ! »

Keranborn, d'ar 4 a viz Gwengolo 1865.

Dorn Doue

D'an Aotrou A. Divy, Eskob Sant-Brieg ha Treger.

Eun deiz ez oan kuzet war lez eur wenodenn,
Gourvezet en disheol 'touez ar yeot, ar raden,
Ha ma-unan eno, e lennen eul levrig,
Hag 'uz d'am fenn e kane, war ar skourr, eun evnig.

Hag e klevis neuze e-biou din o tremen,
Hag heb beza gwelet, eur wreg paour hag he den.
Trist-braz e oant o-daou, stouet gante o fenn,
Hag o vond gand an hent, e komzent evel-henn :

« Gwall-stard e' an amzer, allaz ! hag em-eus doan,
Godig kêz, n'hallfem ket, goude kalz euz a boan,
Ha beva ken dister, paea da hourmikêl ;
Ha setu hebdale, on-bezo eiz bugel !

An ed ne vo ket ker, eur vuoh on-eus kollet,
Ha gand rev miz Meurz on herh 'zo bet gwallet,
Med ar gwasa, on mab 'zo marvet er brezel.
Fañchig paour, gwella paotr a oa en Breiz-Izel ! »

« Dorn Doue, ma den paour ! », 'laras ar wreg neuze.
« N'on-eus netra d'ober, ma den, war gement-se
Nemed plega on fenn, ha labourad bepred,
Ha pedi d'on skoaziañ on Zalver benniget. »

Ne glevis netra ken ; med en-kreiz ma halon
An nebeud komzou-ze 'zo chomet merket don ;
Hag e laren ennon, leun a dristidigez :
« Komzou an dud paour-ze, n'eo ket ar wir furnez ? »

Plouared, d'an 20 a viz Eost 1872.

Giziou koz Breiz-Izel

Ar groaz er bara

Giziou koz on zadou a varv dre-oll en Breiz ;
Gante e varv ivez on nerz hag on feiz,
Hag hebdale, siwaz, e vo ar Vretoned
Heñvel ouz tud Vro-Hall pe ouz an Normanted.

Gwechall, kent ma veze lakaet an toaz er forn
Evid ober bara, gwreg an ti, gand he dorn
A ree eur groaz e-barz, ha 'vel-se kroaz Jezuz,
Poazet gand ar bara, hen gree muioh nerzuz.

Pa veze poaz an dorz, an ozah, gand e gontell,
A ree c'hoaz eur groaz all : neuze da beb bugel
Ha da oll dud an ti, mevelien, mitizien,
E trohe e-unan bara ar gristenien.

Bara heiz a veze peurvuia, pe segal,
Bara al labourer a zoug pe falz pe bal,
A ro dezañ bepred an nerz hag ar yhed :
Bara heiz, yod, krampouez, ha dour 'vid ar sehed.

Evel-se pep hini, en bro ar Vretoned,
A zebre kroaz Doue, gand e vara, bep pred ;
Hag ar feiz a veze neuze gwriennet mad
En kalon ar bugel, 'vel en hini e dad.

Med bremañ e tebrer, en pep ti, bara gwenn,
Ha ne vez kroaz ebed merket war ar vichenn :
Ar gwin, ar gwin-ardant, a ever evel dour,
An oll 'zo aotrounez, gwisket en mezer flour.

Ne glasker nemed lorh, plijadur ha madou,
Ar brezoneg a varv, yez santel on zadou...
Petra a hoarvezo ?... O ! Breiz, ma bro garet,
Ma halon a zo trist ha meurbed glaharet !

Plouared, d'an 8 a viz Du 1872.

Breiz ha maro al labourer breton

D'an Aotrou D'Arbois de Jubainville, den gouizieg en yez ar Vretoned

I

War ribl eun dosenn hlaz eun deiz 'oan azezet,
E-touez ar yeot bleuneg hag ar raden kuzet.
An amzer a oa kaer, dre-oll bleuniou c'hwez-vad,
Ar zaout hag an ohen 'beure d'an traoñ, er prad.

A-zehou hag a-gleiz 'kleven o tirohel
Ar mekanig-dorner : demdost eun durzunell
A gane 'uz d'ar ster goloet a vleuniou,
Ha ma fenn a oa leun a beb rumm huñvreou.

Ha 'n em ankouais beteg an abardaez,
Oh huñvrea oan 'vel-se, hag o klask kraoñ-kelvez,
Ha setu ma klevis, dreist ar roz, eur hlohig,
Truezuz braz : *Tin ! tin !...* Klohig eur chapelig.

Kloh Sant-Jili !... Eur re bennag a zo marvet,
En deiz-mañ, er gêrig : e dro 'oa degouezet.
Tin !... tin !... Aotrou Sant-Per, selaouit mouez ar hloh ;
Digorit d'e ene, sant-Per, a lavar deoh.

II

Tin !... tin !... Per, digorit ; bezañ 'oa Breton mad,
E-keid ma oa er bed, evel ma oa e dad ;
A-viskoaz e' bet paour, ha kalz e-neus poaniet,
Gand e hwezenn en-deus douar e vro glebiet.

Tin !... tin !... Aotrou sant-Per, digorit d'ar paour-kêz,
Leun 'oa e garantez, a feiz, a vadelez,
Doue hag ar Werhez bepred e-neus karet,
Da zent koz Breiz-Izel meur a bedenn laret.

Tin !... tin !... Er goañv kriz, en hañv, en peb amzer,
Dindan ar glao, an erh, pe ar brasa tommder,
E-neus labouret stard, en parkou Breiz-Izel,
Hadet, medet an ed, hep klemm, beteg mervel.

Tin !... tin !... Adal al lun, beteg noz, bep sadorn,
E veze gwelet pal, trañch pe falz en e zorn ;
Koulskoude ne oa ket an den kêz pinvidig,
Hag e veule Doue c'hoaz euz e lodennig.

Tin !... tin !... Karet e-neus e vro, dreist ar madou,
E vro hag ar yez komzet gand e dadou ;
Biskoaz 'n-eus dilezet e vro ger Breiz-Izel,
Med, siwaz ! pa rankas eun deiz mond d'ar brezel.

Tin !... tin !... Neuze 'laras kenavo d'an iliz

'Leh m'eo bet badezet, d'e dud, d'e yaouankiz,
Ha war an enebour e redas, kaloneg,
Evel an oll baotred a gomz ar brezoneg.`

Tin !... tin !... Hag en emgann, nebleh ne oe gwelet
Gwazed hag a veze muioh stard ha kaled,
Dirag an enebour, eged soudarded Vreiz,
Dre ma karont o bro, o Doue hag ar feiz.

Tin !... tin !... Karet e-neus yez Vreiz hag he soniou,
Hag he leuriou-nevez, gourenou, pardonioù,
Kana war an hentchou, hag er parkou, en hañv,
Ha selaou kontou koz, 'tal an tan, er goañv.

Tin !... tin !... Bep sul, bep sul, 'klev e an overenn,
A-greiz kalon e ree da Zoue e bedenn,
Ha 'benn an abardaez, ma veze a-wechou
Eun tamm lemm e lagad, hag uhel e gomzou.

Tin !... tin !... Aotrou sant-Per, petra e' kement-se ?
Peleh emañ an droug ?... Hoh-unan, marteze...
Kemend a boan a zo !... Hag al lun ar beure,
N'eus forz dre be amzer, e' red mond adarre !

Tin !... tin !... Aotrou sant-Per, leun oh a garantez,
Taolit war ar paour-kêz eul lagad a druez,
Digorit frank ho tor dezañ, Aotrou sant-Per,
En baradoz Doue e tle bezañ er gêr !

Plouared, 1873.

Ar pardon

I

Dre barkou ha pradou, pradou leun a vleuniou,
'Leh ma kane laouen an evned o zoniou,
Ez oam degouezet tost, dre eun hent don ha moan,
Da di koz ha santel an Aotrou sant-Erwan.

Ha me 'weled o vond a-raog din eun tammig
Jenovefa Rozell, ar hoanta da blahig
A oufe den gweled en douar Breiz-Izel,
Ha ken kaer kempennet ! Ouz eun êl 'oa heñvel.

« Demad deoh, Jeno goant ! c'hwi 'vad a zo faro !
M'ho koulenn ar henta 'vid ober eun dañs-tro. »
« Trugarez, Alanig : mar don-me gwisket kaer,
N'en-deo ket evidoh ; c'hwi 'zo eur goapaer. »

« Me a baeo, laouen, eur hant alamandez,
Ma n'ho kwelan en-berr, bleunig a garantez,
En-dro da Jolori²², ha krog en dorn Gabig...
Gabig 'zo eur paotr koant ; na ruziit ket, merhig. »

II

Kerkent Jenovefa ah a, skañv, er vered.
Ar gousperou a o a-nevez deraouet ;
An iliz a oa leun, ha war ar voundenn hlaz,
Evel kalz a re all, 'taoulinas, 'tal ar groaz.

Dindan ar gwez ivin, pe harp er mogerioù,
Diskabell, daoulinet, dre-oll 'oa bagadou
Ha gwazed ha merhed, 'n o dorn o chapeled :
Med neb levr na welis, kaer e oa din selled.

Klevet e veze sklêr mouezioù ar ganerien,
O skrijal, o youhal, en iliz, a-bouez-penn :
Ha na zouezit ket, oll o-doa leinet mad,
Evet eun nebeud gwin, a jistr, a-leiz podad.

Dreist-oll 'veze klevet mouez Job Kerborio,
Hag hini Eflammig euz a Gerlochio,
Setu 'r *Magnificat* ! Sevel 'ra peb unan,
Hag e kresk en iliz hag an trouz hag ar han.

Setu 'r prosesion ! Ar hleier 'zo en brall,
Ken a gren beg an tour, ken 'glever o strakal,
Gand an nerz, koad ar stern. Setu ar banniel braz
O tond dre an nor-dal : gwelom piou e' ar gwaz.

Robardig ar Manah ! Henez eo ar hreñvañ

²² Jolori : notenn gand an oberour : Ano eur soner anavezet.

A dud yaouank a vro ; ober a ra gantañ
Tri salud, taol war daol ; hennez 'zo eur paotr mad i
Meur a blah warnezañ a zalh he daoulagad.

An eil banniel a zo etre daouarn Gabig :
E zellou a bep tu a glask e galonig
Goude e teu a-leiz bugaligou en gwenn,
Koantig oll, koantig oll, gand peb a houlaouenn.

Neuze, a-raog an deiz, kalz a êled vihan
A skuill, a-hed an hent, bleun burlu ha balan,
Dindan treid ar beleg a doug ar zakramant
En aour melen, e luh an heol, 'vel diamant.

Kleier, taboulinou, a zo uhel ha sklêr,
Ha tennou pistolenn ha fuzul a lesuker :
Trouz ha tan, ha c'hoaz kan ; kan an dud a iliz
A bign beteg Doue, gand *Ora pro nobis* !

War-lerh e teu ar bobl, da gentañ ar wazed,
Hag ar merhed goude, 'n o dorn eur chapeled ;
Hag e pedont Doue, hag ivez sant-Erwan,
Da gaoud oute truez, da vennigañ o foan.

Hag en daou du a'n hent 'weler, war ar hleuziou,
Paotred ha merhed koant, e-touez bep seurt bleuniou,
Bleun spern ha bleun balan ; beteg war ar brankou,
Er gwez, ar vugale a zo a-dorkadou.

Degouezet en dachenn, gand e zorn e-unan,
Ar person a laka er bern keuneud an tan :
« An tantad ! an tantad ! ». An oll a ra : « You ! you ! »..
Marv e' an tan : bremañ e' tro ar biniou.

III

O ! setu Jolori, diwar e varrikenn,
A halv an dud yaouank evid an aobadenn !
Kalonig ar merhed a drid ouz hen kleved,
Hag o lagad ivez 'zo birvidig-meurbed !

'N em voda a reont oll en-dro d'an dachenn,
Kempennet ar gaerra, gante oll war o fenn
Koefou dantelezet, ha peurvuia ken koant !
En sellou pep hini e weler sklêr e hoant.

Ar baotred a dosta da ober o dibab :
O ! Doue d'o miro deuz ar re a ra goap !
Ar re na gavont, ar re-ze a hoarz glaz,
Hag en-kreiz o halon, o gwarizi 'zo braz.

Ha bremañ, sellit mad ! Pebez da levenez !
En desped d'an tommder, ha d'ar poultr, ha d'ar c'hwez,

'Vel ma lammont en êr ! 'vel ma kemeront poan !
N'e' ket en enor, moarvad, da zant-Erwan.

Ar soner ne bad mui, ha kaer e-neus evañ,
E alan 'zo re verr, hag e krier dezañ :
« Son 'ta, soner ! son 'ta ! rag, ken a vo kuzet
An heol, n'az-po ket peuh ! Ev ha son ! son bepred ! »

IV

Med peleh 'mañ Jeno ? N'he gwelan en neb leh,
Na kennebeud Gabig ; kement-se 'ro din neh,
Rag ne oullan ket koll eur hant alamandez :
Klaskom ; eun tu bennag int eet d'ober al lez.

Nag a dud er pardon ! Koanta da blah aze,
Dindan ar bod spern-gwenn, war ar hleuz, 'n he hoaze' !
Braoa ma'z eo aze ! Boud ganti e karfen !
Deom kuit, rag aon em-eus e trofe din ma fenn !

Jezuz ! 'vel m'eo faro an dud yaouank bremañ !
Setu ar haner dall ; marteze eo amañ
O havin, o selaou eur ganaouenn nevez,
Savet da ziu galon klañv gand ar garantez.

Nann ! an dall koz a gan eur werz gwall druezuz,
Eul lestr kollet er mor, gand eun amzer spontuz.
Gwelom, gwelom pelloh. Setu Youenn Gorvell,
'N e hourvez en douvez, mezv evel eur porhell.

Nag a dud, nag a drouz, dindan an dinell-ze !
Red e' kredi e vent oll mezv-dall dre aze.
Aon braz em-eus e ve, 'raog an noz, taoliou dorn,
Ha goude, marteze, eur re pe dall pe vorn.

Setu Fañch Kerival ! « Mar klaskez Annaig,
Ma faotr kêz, goar ez out diwezad, eun tammig,
Emañ du-ze, d'an neh, krog en kazell Frañsez ;
Me 'gred ne zisplij ket ar paotr d'ar bennherez.

Med te, lar din, d'az tro, ha n'az-teus ket gwelet
Jenovefa Rozell ? » « Ya da, rag he havet
Am-eus o vond ouz traoñ, nan eus ket c'hoaz gwall-bell ;
Da gimiadi eh ee, me a gred, d'ar chapel. »

« Ne oa ket heh-unan ? » « Nann, gand he dous Gabig ;
Hga eñ 'oa ken laouen ! hag hi 'oa ken koantig ! »
« Trugarez ! War o lerh me 'red, hep koll amzer ;
Setu an abardaez, ha poent e' mond d'ar gêr. »

N'emaint ket er chapel ! Eur bedenn verr d'ar Sant,
Ha goude-ze, en hent ! Rag, Jenovefa goant,
M'ho kavo, en eun tu, ha ganeoh ho Kabig,

War lez ar wenodenn, pe dindan eur bodig.

« Demad deoh, ma moereb, Godig a Gerandraoñ !
Larit din pegement 'werzit ar hant, ho kraoñ ?
« Ma aotrou mad, 'vidoh ne 'vo 'med daou real :
Daouzeg gwenneg 'werzan, heb gaou, d'an oll dud all.

Ar hraoñ 'zo kerraet : netra ne hounezer,
Ha poan 'vez o vevañ, ken fall m'eo an amzer !
Gwechall, an dud yaouank 'brene d'ar merhed koant,
Gand an ostiz, bremañ, eh a o oll arhant. »

« Setu aze arhant : tavit, brigouillerez,
Ha roit din, buan, eur hant alamandez. »
« Doue d'ho pennigo ha da roi deoh chañs vad ;
C'hwi hoh-eus kalon vad, kerkoulz evel ho tad. »

D'ar gêr bremañ ! Leun e' an hent a dud,
O tond diouz ar pardon : ha c'hoarz ha kan, ha brud !
« An aluzenn d'ar paour, d'ar paour-kêz dall ha koz,
Na wel mui da greisteiz eged da hanternoz ! »

Henez eo dall koz, Robard Kerbastiou,
A ganas din, 'liez, ha gwerziou ha soniou,
« Ya, setu daou wenneg, dall koz, en ho skudell. »
« Bennoz Doue warnoh, gras deoh de veva pell ! »

V

Braoa da abardaez ! « M'ho kwel aze, Laouig !
Kaer hoh-eus 'n em guza ; koantig e' da zousig ;
Lavar din heh ano. Perag 'ta ma ruziez ?
N'eus forz heh ano, koant e' da garantez.

Lar din, da vihanna, ha n'az-teus gwelet
Jenovefa Rozell war du-ze o voned ? »
« Emañ 'paouez tremen ; er pell all d'al laneg
E tleit he havoud, pe 'barz ar valaneg. »

« Trugarez, ha chañs vad ! ». Son skiltr ar biniou
A deu beteg ennon, gand c'hwez-vad ar bleuniou ;
Setu, a-dreg ar roz, an heol, hag eñ izel :
Son *Kloareg al Laoudour* a ganer du-hont, pell.

Piou a welan du-hont, dindan ar wezenn faou ?
Jenovefa, me 'gred, hag he Gabig, o-daou !
« An avel noz 'zo fresk, aze, war lein ar roz,
Ha pa ver diwezad, Jeno, ar vamm a groz.

Med setu peadra d'he lakaad da devel ;
Setu alamandez da rei da beb bugel,
D'ar breurig, d'ar hoarig, ha d'ar vamm ha d'an tad :
Kollet em-eus ; paeañ a ran, a galon vad.

Doue da vennigo bepred ho karantez,
Ha da roi deoh Gabig da hanter-diegez !
Na ruziit ket 'vel-se ; a-raog ma vo tri miz,
Hoh eureujo ho-taou ho person, 'n e iliz. »

VI

Brao e' bale bremañ, ha mond dre an hentchou.
Ar wenodenn leun a hwez-vad a'r bleuniou !
Setu o tond, war-lerh, teir flah, teri farodez,
Gand tavañjerou ruz ha koefou dantelez.

Gwelom eta piou int : « Hastañ a rit, merhed ! »
« Kalz hent on-eus d'ober, hag an heol 'zo kuzet. »
« Hag ar mammou a groz d'ar plahed diwevad ;
Ar soner 'zo kirieg. ». « Ar soner ? Nann avad ! »

« Noz vad deoh a laran, ha gras da voud digroz,
Ha da gousked ervad, en ho kwele-kloz ! »
Hag ar plahed en hent : da hasta, da redeg,
A-dreuz parkou, koadou, ha prad, ha balaneg !

Med setu-me ivez degouezet en toull ma dor ;
Fantig, ouz ma hleved, a deu hag a zigor ;
Hag en noz, dre ma hun, 'welin c'hoaz ar pardon,
Jeno ha Naig koant, hag ar soner o son.

Krampouez Pardon Plouared

D'ar Vreuriez Keltieg.

C'hwi oll, Bretoned a Bariz,
A 'n em zastum eur wech ar miz,
'Vid komz euz Breiz-Izel, ar vro
A garfet beteg ar maro.

Kredit penaoz em-eus keuz braz
Dre m'on dalhet amañ, siwaz !
Ha n'hallan bezañ en ho touez
Hag ober deoh kleved ma mouez.

Hogen, ma spered en ho kreiz,
War an avel a deu da Vreiz,
A nijo skañv, tra vurzuduz !
Hag e vin ganeoh evuruz !

Ouspenn a zo, ha mar karet²³
Kaoud lod a bardon Plouared,
A zo hirie, hag euz a-bell
Kleved ha gweled Breiz-Izel,

Setu amañ krampouez-gwiniz,
Krampouez pardon, hervez ar hiz,
Greet gand bleud gwiniz, lêz, viou.
Debrit peb a unan pe diou.

Ar gwiniz er park a zavas,
Ha gand an heol zarevas,
Ha pa oe medet, war ar skourr,
Evnedigou a gane flour.

Eur vuoh vriz 'roas an amann,
Ivez al lêz, fresk ha gwenn-kann,
Greet gand ar yeot ha gand bleuniou
A'r parkou hag a'r menezioù.

Hag ar viou, eur yarig wenn
O dozvas, war zolier ar foenn,
'Leh m'he-devoa he neiz kuzet ;
Med dre he han eo bet kavet.

Hag ar hrampouez a zo bet greet
En Keranborn, en Plouared,
Gand eur vatez koant, eur plahig
A gane laouen eur zonig.

Debrit 'ta, paotred, ma hrampouez,

²³ mar karet : mar karit.

Ha neuze e savfet ho mouez
Evid kana meulodi Vreiz
Ha soñjit enni, noz ha deiz.

O ! Breiz-Izel, o ! kaerra bro,
Koad en he hreiz, ha mor en-dro,
N'eus ket a gaerrañ²⁴ bro er bed,
Ha dreist-oll da garin bepred !

Plouared, miz Gouere 1879.

²⁴ a gaeroh, er skrid orin.

Tiegez Fantig

Eur bloaz a vezo bremaig
Abaoe ma timezas Fantig ;
Heh eured a oe d'an amzer
A'n avalou eost hag a'r per.

Da Fañchig Madeg e roas
He c'hoantiri, he zriweh vloaz.
Ha greet mad he-deus, a dra zur :
Fañchig Madeg 'zo eun den fur.

Anavezet em-eus Fantig
N'oa c'hoaz nemed eur bugelig :
Kanet 'deus din kalz a zoniou,
Diwar he harr²⁵, en nozveziou.

D'am bro ger pa'z on distroet,
Em-eus c'hoantaet he gweled,
He gweled en he ziegez,
Rag bremañ n'e' ken matez.

Dre ma tostaen d'an ti-plouz,
Dre ar wenodenn, heb ober trouz,
E kleven mouez sklêr ar wregig,
O kana ker koant he sonig.

Hag e chomis pell d'he selaou,
Harpet ouz troad eur wezenn faou,
Hag e kleven mad ahane
Gwerz *Fieka Kalvez* 'gane.

Ha pa oe ar werz peurganet,
Ez on eet, hag em-eus laret :
« Demad, demad deoh, ma eostig !
'Vel ma'z e' gêr ho kalonig ! »

« Jezuz ! 'vel m'hoh-eus ma spontet !
Penaoz c'hwi eo !... Penaoz e ret²⁶ ?
Deut en ti, deut da azeza. »
Hag e leuskas he harr-neza.

« Deut da weled ma ziegez ;
Fañchig a zo eet d'e zevez ;
Eur gwele-kloz hag eun armel,
Ha diou loa goad ha diou skudell ;

Eur pod-houarn hag eun trebez,
Eur billig du da aoza krapouez,

²⁵ he harr : he harr-neza.

²⁶ ret : rit.

Peb a skabell da azeza,
Hag eur harr nevez da neza ;

Eur piched da lakaad dour sklêr,
Eur boutou-koad, eur boutou-ler,
Dillad d'ar zul ha d'ar pemdez,
Arh koz ha melezour nevez.

Neuze em-eus c'hoaz eur haz gwenn
Da dapoud raz ha logodenn,
Eur hog ruz a gan d'ar beure,
Hag a lar dim : "Setu an de' !"

Diou yar rouz, gand peb a glodad,
Diou vaoutez du hag eun dañvad,
Ha, da vloaz, eur vuoh, marteze,
Mar nezan a-walh evid se.

« Eur bugelig, gand gras Doue,
A deuo d'e amzer ive' :
En doujañs Doue hen savfom,
Hag evitañ e labourfom.

Ha setu perag ma halon
'Zo gê, hag e kanan eur zon :
Ha setu tiegez Fantig,
Ha setu tiegez Fantig. »

An den mezv hag an arched

I

Kaour Manah 'n-eus gwelet an Ankou o tremen,
Neizeur, dre an hent don 'leh ma kan ar gaouenn.
'Trezeg ar Gerouez eh ee, e-barz an noz du,
Ha Kaour, pa hen gwelas, e-neus laret dioustu :
« Warhoaz, kent ar huz-heol, 'tiskenno ar Maro,
Siwaz ! er Gerouez : Ma Doue d'on miro ! »

War e goz karrigell, e garrigell eskern,
Staget outi daou varh, du evel an ivern,
Liñseliou gwenn a-uz, 'oa ar skeud azezet,
'N e zorn dehou e falh, e falh nevez lemnet,
En toull e zaoulagad 'luhe diou hlaouenn-dan,
A-raog eur gaouenn, ha war he lerh eur vran.

'N deiz-war-lerh ar beure, en tour bourk Plouared,
Ar hlaoh a zone glaz ; 'vel eur vouez hlaharet,
Truezuz e lare d'an dud diwar ar mêz :
« Pedit oll, kristenien, pedit Doue, tud kêz,
Pedit er menezioù, pedit en traonienno'
Eur breur deoh 'zo marvet, 'barz ar barrouz, hirio !

Pedit 'vid e ene, pedit, mesaerien,
Foennerien, falherien, hag ivez mederien,
Pedit, klasker-bara, ha c'hwi, pillauer paour ;
Meder, chom war da erv, chom ivez, baleour ;
Dizoloit ho penn, ha larit en eun dro :
"Ene paour ma breur kêz, Doue d'az kemero !" »

II

Ar halvez Yann Jego du-hont stard a labour,
En maner Kernahamm, ken a ziver an dour
'Vel eur waz, euz e dal ; rabaotañ, heskenni,
Toull 'ra till ha faou, ha skei ha kompezi,
Rag ar zadorn ez eo, ha 'benn noz 'fell dezañ
Peurober krenn e garr : ezomm 'n-eus da hastañ.

Yannig Kersalaun a heuill ar wenodenn
A gas da Vernahamm ; setu-eñ o tremen
Dre brajou Keranborn, ar parkou, ar hoajou ;
Mond 'ra da hourhemenn 'vid Fañch Kerboriou,
Marvet en tarz an deiz, en e di, eun arched.
Yann Jego a lavar atao, p'e-neus klevet :

« Doue da gemero e ene, an den mad !
'Vid e re hag ar paour, setu gwall galonad !
An arched a vo greet a-raog an overenn,
Warhoaz, euz ar mintin ; ma-unan, o tremen
Evid moned d'ar bourk, 'n e di, er Geroue,

Hen lakain, heb mar. Ra vezo gand Doue ! »

III

An deiz-war-lerh, eur zul, Yann a zibab plenken²⁷,
Beure mad, er zolier. Kemer 'ra e heskenn,
E rabot, e vorzol, trohañ 'ra ha tachañ.
Setu greet an arched. Ar houlz a zo bremañ
Da vond d'an overenn, ha Fañch Kerboriou
A vezo douaret goude ar gousperou.

Bet ez eo an eil son ; poent-braz ez eo hastañ,
Yann a wisk e zillad d'ar zul ; emañ bremañ
War hent a'r Gerouez, an arched war e skoaz.
Gwall domm eo an amzer ! Pell e-neus d'ober c'hoaz ;
Setu ti Kaboko, 'leh ma kaver chistr mad.
Mond a ra en ti, evid evañ eur chopinad.

Mez Youenn ar Manah, ar zoner Jolori,
Kermoal, ar gwiader, Erwanig Helari,
Re all c'hoaz, 'oa eno, oh evañ, o kanañ.
« Yann, ne dañvai ket euz ar chufere-mañ ?
N'eus tra gwelloc'h er bed ; an evaj-mañ, heb fent,
Yah askorn torret, gwell 'ged relegou sent. »

Yan a houl chopinad, stokañ a ra gante :
« Gwir hoh-eus lavaret, paotred, ar chufere
'Zo ken mad, ken n'evis kerkoulz hag hen biskoaz.
Gwella da chufere !... God, eur chopinad c'hoaz ! »
Meur a hini goude e-neus bet goulennet,
Ha war gornig an daol 'n-eus lakaet e arched.

Echu eo an overn, ivez ar gousperou,
Hag an dud dre an hent dija a deu en-dro,
Ha Yann Jgo 'zo c'hoaz 'barz an ostaliri,
Oh evañ, o kanañ, oh ober cholari,
Gand ar ganfarded all, ha keit-se an arched
'Zo amañ ha du-hont taolet ha distaolet.

Hag en bourk Plouared 'n em skuiz ar beleg
O hortoz ; mez eun den a deu, en eur redeg,
Hag a lavar penaoz ar horv 'zo heb arched,
Rag, kaer o-deus gortoz, Yann Jego ne deu ket.
Ar peron 'lar neuze : « Warhoaz 'vo douaret ;
War-dro deg eur vintin 'vo an overn laret. »

IV

Re all a zo degouezet 'barz ti Kaboko,
Glaouerien Koad-an-Noz, du evel diaoulo'.
Eno 'zo eur sabat ! Mezv-dall ez int-i oll,
Ha trouz, leou-Doue, hag eur c'hoari diroll ;

²⁷ plenken : pleñk.

Ha taoliou-dorn en-dro ! Ha bremañ an arched
Diwar gornig an daol, dindan zo diskaret.

Eur glaouer du nerzuz a lamm gand Yann Jego :
Taoliou-dorn, taoliou-penn, hag ivez bahado' !
Yann gêz 'zo diskaret, pilet gand paotr ar hoad,
Deuz e fri, e henou, e benn, 'tilaamm ar gwad !
Leusket eo evel marv, ha neuze astennet
War e gein en arched gand jistr ha gwin glebiet.

Eun arched all 'zo greet da Fañch Kerborio
Gand Eflammig Tepot. Echu eo 'n obido' ;
Ha douaret ar horv, dindan an ivinenn ;
Bet 'zo en-dro d'an toull kan, hirvoud ha pedenn.
Bremañ, 'n touez e dud koz, ha dindan ar yeot glaz,
E kousko, da hortoz ma teuy deiz ar varn vraz.

V

'Benn ma savas an heol, Yann Jego 'zo marvet,
Heb beleg na pedenn, hag ez eo bet tached
En arched en-doa greet 'vid Fañch Kerborio.
'Leh 'oa bet astennet, gand e oll houlio',
Gand glaouerien ar hoad, paotred rust ha digar.
Evid hen kas d'ar bourk 'oe taolet en eur harr.

Hogen, darn a lavar penaoz, a-raog an deiz,
Leun an ti a dud veo, hag an arched 'n o hreiz,
Daou ziaoul ruz, euzuz, eno 'zo degouezet,
O-deus tennet ar horv er-mêz euz an arched,
Hag, en kreiz eun tan glaz, an douar digoret,
O ! pebez tra spontuz e-neus oll o lonket.

Kement-ze 'zo kontou : Yann a oe douaret,
Evel Kerborio, en bered Plouared.
Tost da Gerborio. An touller koz a lar
Penaoz, deg vloaz goude, pa doullas an douar
El leh-se 'vid eun all, e kavas 'n e arched
Eskern Kerborio, leh ma oa bet lakaet.

O anavezoud a reas diouz ar chapeled
Hag eur groazig arhant 'oa gantañ douaret :
Mez arched Yann Jego 'oa goullo, 'n e gichenn !
Penaoz 'oa c'hoarvezet kement-se, kristenien ?
Kerborio a oa en e arched kentañ :
Egile ?... Ne ouzom 'oa c'hoarvezet outañ²⁸.

²⁸ ouzom 'oa c'hoarvezet outañ : ar pez a oa c'hoarvezet gantañ.

Ar vro

Bepred Breizad

Greet em-eus eul levrig anvet *Bepred Breizad* ;
Eno em-eus kanet ma bro hag he gizioù,
En yez ma zadou koz 'welan gand kalonad
Dilezel 'vid yez Hall hag he neventizou.

Darn a gav ma levr fall, ha muioh hen kav mad,
Med nan-eus ket²⁹ a forz. Mar lennit ma gwerziou,
Me 'gred 'vint deread, kenvroiz, d'ho lagad,
Dudiuz da gana, er goañv, en nozveziou.

Lennit 'ta ma levrig ha kanit ma zoniou,
En korn ar fornigell, war hent ar pardonioù.
Hag o hanit heb doan : n'eus enne droug ebed,

Hag e karfet ganen yez kaer on zadou koz,
O hredenn hag o feiz (warneze ma bennoz !)
Hga e lavarfet oll : « *Me 'zo Breizad bepred !* »

Plouared, d'ar 24 a viz Eost 1866.

²⁹ nan-eus ket : n'z eus ket (stumm Treger).

Beza Breizad

Beza Breizad 'zo eun enor !
Ya, Doue da vezo meulet,
Me 'zo eur paotr euz an Arvor.
Trist 'vije ma halon, kredet³⁰,
Ma ne vijen en lez ar mor
Pe en meneziou Breiz, ganet.

Paotred Vreiz n'int ket heñvel
Ouz al louarn, leun a ardou ;
Oll ez int eeun beteg mervel,
O ene 'weler 'n o zellou.
Mui gwirion na zo tost, na pell³¹ ;
Oll ez om mibien on zadou.

Gizioù Breiz 'zo dreist ar re all³²,
'Vel dresit an haleg an dervenn,
Ha pa glevan 'barz en Bro-Hall
Eur ger ma bro, eur ganaouenn,
Setu ma halon da dridal
Ha da lammed em hreiz laouen.

Baleet em-eus dre galz bro,
Gwelet peb rumm tud war ar bed,
Ha pa daolen eur zell en-dro,
En peb leh em-eus bet laret :
« Ya, me 'gar Breiz, hag he haro,
Dreist peb bro, bremañ ha bepred ! »

An neb en-deus c'hoant da weled
Ar re vad karet, hag ar feiz,
Ha Doue gand an oll meulet,
Bro ar merhed fur, an dud reiz,
Ar Vro gand Doue benniget,
Hastit, hastit moned en Breiz !

Neuze 'vo klevet o lared :
« Beza Breizad 'zo eun enor !
Me am-bije ivez karet
Bezañ eur paotr euz an Arvor,
Bezañ eno 'n eun tu ganet,
Er menez pe en lez ar mor ! »

Prad, d'an 29 a viz Eost 1860.

³⁰ kredet : kredit.

³¹ Mui gwirion na zo tost, na pell : galleg : N'eus ket tra gwirionnoh, nag a-dost, nag a-bell.

³² Gizioù Breiz 'zo dreist ar re all : gouennelour e oa Fañch an Uhel, kenkouz hag ar Hallaoued a felle dezo laza ar brezoneg.

Breizadez on

Breizadez on. Sell ma lagad,
Glaz evel hini mamm ha tad,
Karantezuz 'vid an dud reiz,
Du, teñval 'vid enebour Breiz !

Breizadez on. Ma harantez
Ne deh ket a-raog ar baourentez,
Gwell eo ganin mervel raktal,
'Vid boud pinvidig 'n eur vro all.

N'eo ket Breizad an enb na gar
Breiz dreist peb bro war an douar,
Ra 'n em denno diouzin pell,
En Breiz ne zlefe ket genel !

N'eo ket Breizad, ha ma halon,
Hep truez, ha kounnaret don,
Warnañ 'houlenn malloz al loar,
Malloz an neñv hag ar gounnar !

Breizadez on. Ma halon reiz
'N em laka da dridal 'n em hreiz,
Da dridal laouen, da lammed,
'Vel ma klevan ma bro meulet.

'Vel-se eun deiz e lammo c'hoaz
O komz euz an hini d'am choaz
Ganet 'veldon en Breiz-Izel,
Ha 'vid e vro prest da vervel !

Breizadez on, glaz ma lagad,
Melen va³³ bleo ha kalon-vad :
Dreist pep tra e karan ma bro³⁴,
He harin beteg ar maro !

³³ va : e-barz eun nebeud linennou e ra gand "va" ha gand "ma".

³⁴ Dreist pep tra e karan ma bro : eur mennoz a vez kavet e peb bro dre ar bed oll.

Yez on zadou

Te, yez koz, e' buhez Vreiz !

Yez on zadou, yez venniget,
A beb amzer komzet 'n on hreiz,
Dreist pep tra am-eus da garet,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Te 'm-eus karet hag a garin,
Yez on zent koz, yez kaer ar feiz,
War ar bed keit ha ma vevin,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Te 'ro din yehed, pa ven klañv,
Te laka sklêr ha glan an deiz,
Yez Taliesin ha Gwennhlan,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Er broiou pell, ma halonig,
Evel eur wennili d'he neiz,
A huanad d'an Armorik,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Gwasket out gand ar Hallaoued,
'Eneb ar gwir, 'eneb ar reiz,
Mez dit e' ma halon bepred,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

'Vel ma tiwall ar mesaer
E oanidigou euz ar bleiz,
Breiziz, diwallom on yez kaer,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Pa vez ma spered ankeniet,
Ha glahar em halon, a-leiz,
Gand eur zonig 'vez diboaniet,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Gouzañvom pep poan, tud ma bro,
Evom dour, debrom bara heiz,
Dalhom d'on yez, beteg ar maro,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Gand eur werz koz ha sin ar groaz,
Ar paour kêz, pa houlenn lojeiz,
Hen degemerit, gand joa vraz,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Kanom on gwezriou, on zoniou,
Stourmom, 'vid ne vefom ket eur preiz
D'ar re hall ; mirom on giziou...
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Ha ni, barzed nevez Arvor,
Ni a dou oll dirag an deiz,
Dirag an heol, dirag ar mor,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Ni 'droho krenn on zeod 'n on beg,
Hag a skuillo on gwad a-leiz,
Kent 'ged dinah ar Brezoneg,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Evidon 'lar hag a laro³⁵ :
Keid ma lammo kalon em hreiz,
Yez ma zud koz, me az karo,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

Ha goude buhez ar bed-mañ,
En eur bed all am-eus ar feiz
Da gomz Brezoneg, 'vel amañ,
Rag te, yez koz, e' buhez Vreiz.

An Oriant, d'an 31 a viz Gouere 1867.

³⁵ Evidon 'lar hag a laro : evid ar pez ouzin e laran hag e larin.

D'an Aotrou Augustin David

Eskob Sant-Brieg ha Treger.

C'hwi a zo eun den mad hag a gar en pep tra
Al lealded, ar wirionez ;
Leun oh a gomzou mad 'vid peb den, ha netra
N'hall trehi war ho karantez.

'Vel-se ez oh karet dre-oll, en Breiz-Izel,
Pep hini a oar hoh ano,
'Hag eun deiz a deui, marteze n'e ket pell,
Pep hini en Breiz ho kano ;

Rag an amzer fall-mañ, teñval evel an noz,
Leun a hlahar hag a anken,
Pa hoantaer mouga mouez ha feiz ar re goz,
C'hwi 'ziskouez dim ar sklêrijenn.

'Barz kant vloaz hag ouspenn, mar komzer en on bro
On yez karet ar Brezoneg,
Ha mar dalh ar Breton d'e yez, beteg ar maro,
Da gement-se c'hwi 'vo kirieg.

Larit d'ho peleien, larit deze aliez :
« Tud keiz, labourit ha poaniit
Evid harz da vervel ar Brezoneg, ho yez :
Komzit ho yez ha studiit. »

Pa deufet da vale neuze er parroziou
War ho hent, 'leh ma tremenfet,
C'hwi 'glevo a bep tu an heveleb komziou :
« Henez e' ma eskob, sellet³⁶ !

Henez a gar tud Vreiz, en e galon, paotred,
Henez a gomz Brezoneg mad ! »
Breton, 'fell din lared evel ar Vretoned,
Hag ivez ho trugarekaad !

Plouared, d'an 18 a viz Gouere 1872.

³⁶ sellet : sellit.

D'an Aotrou Théodor Hersart Kermarker

Aotrou Hersart, ar barz, n'ho 'm-eus morse gwelet,
Koulskoude ho karan, hag en Breiz hag en Gall³⁷,
'Leh ma vez dirazon eul levr bennag meulet :
« Lennit ar *Barzaz Breiz* ! », a lavarn raktal.

Hennez e', a-bell 'zo, ma levr muia karet,
Hag en neb bro ar bed ne welan ket eun all
A ve kaerroh 'getañ. Liez am-eus laret,
O weled 'vel d'on yez an amzer-mañ 'zo fall :

Allaz ! allaz ! peleh an amzer, en Arvor,
Er menez hag er hoad, ivez en aod ar mor,
E kane barzed Vreiz oberou an dud vad ?

Peleh an amzer-ze ? Tremenet ! tremenet !...
Med en ho levr, Hersart, e karan c'hoaz kleved
Ho mouez, a ra tridal kalon pep gwir Vreizad.

Kemper, d'an 28 a vie Mae 1861.

³⁷ Gall : Bro-Hall.

Klemmgan war varo P. Proux. Barz Breiz

Kenavo ! kenavo !

I

Perag c'hoantaad mond kuit, o ! barz ?
Sell, pep tra 'zo kaer hag a hoarz
Bremañ ouz an den war ar bed,
An heol, ar bleuniou, an evned.
Chom ganim c'hoaz eur pennadig,
Kan dim eur werz pe eur sonig,
Rag te 'oar, gand eur ganaouenn
Lakaad prim pep kalon laouen.

Allaz ! an amzer a zo fall
Kerkoulz en Breiz 'vel en Bro-Hall,
Evid c'hoarzin, kana soniou,
Hag er prajou kutuill bleuniou.
Allaz ! kaer am-bo c'hweza stard,
Bepred e tavo ma bombard,
Pe mar kan, e vo truezuz
Evel kan eun anaon klemmuz.

A-dreñv kañvou, teñvalijenn !
Sell en oabl tad ar sklêrijenn,
A skuill dre-oll levez,
Ar yehed hag ar garantez ;
Sell, er parkou hag er prajou,
El lanneg, evel er hoajou,
Pep tra 'gan an nevez-amzer,
Ar bleuniou koant, an alhweder.

Evned bihan, kanit bepred.
Er hoajou, e-tal an dour-red ;
Bleuniou al lanneg hag ar prad,
Bezit plijadur al lagad ;
Med ar Barz koz ne gano ken :
E galon 'zo leun a anken,
Rag oll kement e-neus karet
Allaz ! 'zo bremañ diskaret !...

A ! malloz ruz war ar brezel !
A ! oll vugale Vreiz-Izel
A zo o halonou, heb mar,
'Vel hoh-hini³⁸, leun a hlahar :
Med, Barz ker, kemer da vombard,
Ha c'hwez enni, c'hwez enni stard ;
Ouz da gleved, ar Vretoned

³⁸ "hoh-hini", ha pelloh "da vombard" : kemmeska a ra "c'hwi" ha "te".

A 'n em ganno 'vel leoned...

Ya !... Pedom Doue d'on zikour,
Ha malloz war an enebour !
Red eo trehi, paotred vad Breiz,
Kerzom kaloneg ha gand feiz !
Red eo trehi... kriom : you ! you !...
Me 'vo ganeoh, ha ma gwerziou
Leun a garantez 'vid ar vro,
Ho kraio treh, kent an distro !

« Torr e benn ! Trehi pe vervel !
A-raog, bugale Vreiz-Izel !
A-raog ! eur gwir Vreizad biskoaz
Dirag eur hleze ne dehas :
Ar maro kent an dizenor
A vezo bepred ger Arvor ! »

II

Evel-se 'kane ar barz mad ;
Uhel e benn, lemm e lagad,
E kane gand kalon ha nerz
E gan kaer, e ziweza gwerz.

Med dregañ e oa an Ankou,
Gantañ e falh 'n e zorn dehou,
Ha gand eun taolig, hep truez,
'Trohas e gan hag e vuhez.

Hag ar genou 'gane gwerziou,
Gwerziou a vrezel ha soniou.
Levenez an dud a beb oad.
Setu-hañ bremañ leun a wad !

A ! pebez glahar, Bretoned !
Setu marv roue ar Varzed,
Prosper Proux, ar haner lirin
A lakae an oll da hoarzin !...

Ar Barz karet e-neus savet
Ar soniou koant a vez klevet
Kana a bep tu 'barz ar vro,
Falhet eo bet gand ar Maro !

A ! falher dall ha dinatur,
Te a skuill glahar dreist-muzur ;
Perag skei 'vel-se, en on hreiz,
Ar Barz, plijadur oll dud Vreiz ?

Allaz ! piou 'frealzo bremañ
Ar paour-kêz gwasket er bed-mañ ?
Rag netra ne dalv eur sonig

‘Vid kalon an den reuzeudig.

Kenavo, Barz ker, ma mignon,
A garen a-greiz ma halon !
Amañ pep tra a dro da fall,
Te ‘zo gwelloh en eur Vreiz all ;

Er vro ‘leh ma’z eo pep tra gwell,
E-leh nan eus droug, na brezel,
Trubarderaj³⁹, na kasoni,
Na poan, na kleñved, na kozni.

Aezet war o hadoriou,
Ar varzed ‘zelaou da zoniou,
Ar varzed koz a gane c’hwek,
Hag a gomze ar brezoneg.

Brizueg, ar barz e vleo melen,
Mestr ar gwerziou, mestr an delenn,
‘Vid da zegemer ‘zo savet,`
Hag eñ e-neus d’an oll laret :

« Prosper Proux, eur Barz a’n dibab !
N’oa ket en Breiz a welloh mab !
‘Veldon e-neus karet e vro,
He hanet, beetg ar maro ! »

M’o-deus laret, ar varzed koz :
« Ganit, kenvreur ker, on bennoz !
Kan dim-no darn euz da zoniou,
En yez Vreiz, hag euz da werziou. »

Ma kanas *Kimiad*, ha *Distro*
Soudard Breiz-Izel en e vro,
Ma vijen Barz, *Mouez ar hleier*,
Hag ivez son ar *Merhetaer*...

Kalz a re all ; ha setu c’hoarz,
O klevet soniou koant ar Barz.
Bep tro ‘larent : « Koanta sonig !
Kanit bepred ; c’hoaz unanig... »

O ! kaner c’hwek, o ! Barz karet,
‘Vid beza da gorv douaret,
Ne varvo biken da ano,
Ha tud Vreiz bepred a gano.

Da zoniou koant ha da werziou,
War an hentchou, er pardonioù,
Ha *Bombard Kerne* ‘vo meulet

³⁹ Trubarderaj : treitouriez.

Keit 'vo eur Breizad war ar bed.

'Vel eur gwir Varz ez out marvet,
Gand ar bleuniou, kan an evned ;
Eet out euz on touez ; dim kañvo' :
Med bev ez out c'hoaz... Kenavo !

Plouared, d'ar 14 a viz Mae 1873.

Eñvoriou

Ma bro

Ken liez ma teuan d'ar vro,
Ne zlejen boud kuiteet biskoaz,
E fell din gweled tro-ha-tro
Ar pezh a welan bremañ c'hoaz
En hun, hag a laka dareo'
Em doulagad, allaz ! allaz !

Setu aze ar fornigal⁴⁰

'Leh ma teue 'pad ar goan,
Ar barz baleour Gorvan dall,
Gand e vaz hir, a-houde koan,
Da gana gwerziou a wechall
Da gonta kontou, 'tal an tan.

Ha me, sioulig, war ma skabell,
A zelaoue gand eston braz,
Peb ger kouezet euz e vuzell,
Eur werz koz pa son an Evn glaz,
Gwerziou kaer an dud a vrezel,
D'ar Zaoz o toui gwall ha laz.

P'azezan war ar skabell goad,
Bremañ c'hoaz, e kredan gweled
Ar barz koz brevet gand an oad,
Ha skeud an deiziou tremenet
A zav dirazon, ha ma gwad
Tommoh ha yaouankoh a red.

Eom d'al liorz, da weled
Ar voudenn hlaz 'leh ma reden
War-lerh ar c'hwiled alaouret,
'Leh, war ar bleuniou ruz ha gwenn,
En amzer gaer, 'veze bepred
Malvennou-Doue⁴¹, ha kelien.

Allaz ! perag 'ta ar bleuniou
A welen gwechall ken laouen
Ha ken koant, e-touez an deliou,
Hag a zave seder o fenn,
Perag m'o havan hep c'hweziou,
Hqag o gwelan trist evel-henn ?

Allaz ! mamm baour, pa n'az kwelan,
Evel kent, e-touez da vleuniou,

⁴⁰ fornigal : fornigell (evid rima gand "dall").

⁴¹ Malvennou-Doue : ?

Ouz o difoennañ, o dourañ,
Hag o tennañ an drouglouzhou ;
Ya, seblantoud 'reont gouelañ,
Ha 'n em glemm d'an evnedigou.

Gwelom ar hoajou, ar parkou :
Anaoud a ran c'hoaz pep gwezenn.
Piou 'laro biken an neziou,
Er harz spern hag er goz dervenn,
A laeris d'al labousigou,
Bran, moualh, turzunell pe golven⁴² ?

Setu ivez ar stank aze
Tro-dro burlu, bleuniou an hañv :
Pe liez a wech, em hoañze'
Dindan ar gwern, war ar mên-mañ,
Ma zreid en dour sklêr a'r waz-se,
E vezen gwelet o kanañ !

Dour ar feunteun 'zo sklêr bepred,
Ha fresk, ha yen, dindan ar gwern.
Ma skeud, en dour, am-eus gwelet ;
Eom kuit, rag gand e eskern
An Ankou tristoh nan e' ket !...
'Vel ma zo c'hwez-vad gand ar spern !

War hent ar bourk ez on bremañ :
'Vel ma'z eo kresket peb gwezenn !
Setu stank ar Pont-Meur amañ,
Ha setu ivez ar faouenn
'Leh, gand ma hontell, a gredan,
'Skrivis ma ano, er bluskenn.

Setu beg an tour, dreist ar roz !
Kerkent ma halon da dridal,
Ma yaouankiz, n'ouzon penaoz,
'Zav dirazon, soñjou gwechall
'Zo leiz ma fenn... evid henoz
Ne gouskin ket, pe 'kouskin fall.

Demad, salud dit, iliz vraz,
'Leh ma lakaas da gristen
Ar person koz ma badezas !
Amañ, bep sul, en overenn
E peden, e reen sin ar groaz,
Hag, er gousperou, e kanen.

Allaz ! peleh 'mañ an amzer,
Eur gurunenn gaer war ma fenn,
Frizet ma bleo, ha gwisket kaer,

⁴² golven : golvan.

Dindan lagad ma mammig ker
Gwisket evel eun êlig gwenn,
Ken evuruz ha ken laouen.

E skuillen burlu, bleun balan,
Bleuniou ruz ha gwenn ha melen,
'Leh ma tremene o kanañ
Ar prosesion, ar groaz e penn.
Ar hleier 'glevan o vrallañ,
Hag o kanañ, ar veleien.

Ha setu amañ ar vered,
'Leh ma kousk ma mamm ha ma zad,
'Leh ma karfen mond da gousked,
En o hichenn, eneoù mad,
Gand ma zud koz a zo marvet,
Kent m'o gwelas ma daoulagad.

Amañ 'kousk re goz ar barrouz,
Dindan ar sapr, an ivinenn,
Bep sul, zoken en amzer louz,
War o beziou 'vez greet pedenn ;
Ar vugale, gand c'hoarz ha trouz,
Eno 'hoari, war ar hlazenn.

Hag ar re varv keiz a glev c'hoaz
Kana gousperou, overenn,
Dindan ar bleuniou, ar yeot glaz.
Hag ar hleier a zon laouen,
D'ar zuliou ha d'ar goueliou braz ;
An eostig a gan 'uz d'o fenn.

Pa deu d'an iliz eun eured,
Gand levenez, c'hoarz ha bleuniou,
Pe eur bugel nevez-ganet,
Da vadezi, 'uz d'ar beziou
E tremenont, o lavared :
« Bennoz Doue d'o eneoù ! »

Neuze, pa zon an hanternoz,
E-touez ar re varv 'mañ ar hiz
Da zevel en o beziou kloz,
Ha da vond, en spez, d'an iliz :
'Vid ma'z aint oll d'ar baradoz,
Kristenien, eun *De profundis* !

Hag ar person koz a lavar,
'Vdel gwechall, deze an overenn,
En skeud ar stered hag al loar,
Pa darz an deiz, peb ene gwenn
A nij d'an neñv, ha d'an douar
Ar horv 'n e doull du a ziskenn.

Goude oll drubuillou ar bed,
Doue, bezit ouzin truez,
Ha, dreist al loar hag ar stered,
Ma galvit d'ho rouantelez,
Gand ma zadou koz 'zo pignet
Ganeoh, da gaoud ar wir vuhez.

O ! iliz koz, bered ma bro,
Ra vo ho tour benniget.
Prestig e tegouezo ma zro,
Hag e vin ivez douaret
E-kichenn ma herent varo
O-deus bet gand furnez bevet.

Pa glevin c'hoaz warnon, em bez,
Komz en brezoneg tud ma bro,
Ar re yaouank, 'h ober al lez,
Bep sul, goude ar gosuperou,
An eostig 'kanañ 'uz d'e neiz ;
Me ne gredan ket d'ar maro.

Kemper, d'an 19 a viz Du 1860.

War maro ma zad

O ! ya, mad az-teus greet, mad az-teus greet, ma zad,
O vond euz ar bed-mañ ! Pep tra a dro da fall,
Hag an dud a deu droug ; mervel 'ra ar re vad,
Heb na keuz nag anken, 'vid mond en eur bed all ;
Heb na keuz nag anken, 'serront o daoulagad.

Evuruz an dud wir a dremen 'vid moned
Da veva gand Doue ! Ar poaniou, ar glahar,
Hag an oll fallentez a zo o ren ar bed :
Ar hleñved, an daerou on gwask war an douar :
El leh m' emaint bremañ, n' o anavezont ket.

Evuruz out, ma zad, o veza tremenet !
Ne weli mui an droug, ar gernez, ar vosenn,
Ar brezel, hag ar pez a zle boud milliget,
An drubarded, ar re a gar o mad hepken,
Hag a ra o Doue euz a vadou ar bed.

Med en liorz an neñv, ma zad, te 'azvevo ;
'Touez an dud fur ha mad gand Doue 'vi lakaet,
Dreist al loar hag an heol, en parkou an neñvo',
'Leh n' anavezer ken droug, na poan na kleñved,
El liorz deread, liorz an Eneo'.

A ! 'vel am-eus gouelet, ma zad ker, en nozvez
Ma'z out bet tremenet ! Ha pa oe diskennet
Da gorv paour en douar, pebez tristidigez
A ziskennas warnon ! ma'z e' din seblantet
'Oa ivez ma halon douaret 'barz da vez !

Med da betra gouela ? Doue trugarezuz
Da ouie eun den fur ha leun euz a druez
En-keñver ar re 'oa dinerz hag ezommuz ;
Anaoud a ree ivez da feiz, da garantez :
Doue 'zo eur mestr mad, eun taol karantezuz.

Youl Doue ra vo greet ! War an douar ma'z om,
'Vel ma teu da dremen eur hrouadur karet,
Eun tad, eur vamm, eur breur, e ouelom, 'hervoudom...
Ha perag kement-se ?... Ar maro n' e' ket greet
'Vid an dud eeun ha fur, war ar bed ma vevom.

Med 'vel-se 'mañ an den, honnez eo al lezenn.
Ha koulskoude me 'gred mervel a zo eur vad
Evid an oll dud fur, rag Doue o goulenn
Evid beva gantañ (n'eo ket gwir, se, ma zad ?)
El leh ne vezo mui neb droug na neb anken.

En bered da barro, da gorv 'zo douaret,

En-kichenn on mamm ger, a oa ouz da hortoz.
Goude poan ha trubuil, en peuh 'hallez kousked,
En douar benniget, en-touez da dadou koz,
Da ene 'zo en neñv, ha da gorv er vered.

Da gorv 'zo distroet adarre d'an douar ;
Da gorv a yay en poultr, gwentet gand an avel ;
Med nan eus ket a forz : gouzoud a ran heb mar
Da ene mad ha gwenn ne zle biken mervel :
Nann ! nann ! ne varvi ket, ma zad ker, me hen goar.

Pa deuio da drouza trompillou ar varn vraz,
Beteg kreiz an douar, neuze 'vezo spouron,
Neuze 'vezo skrign-dent, garm ha glahar, allaz !
Med te 'zavo, laouen, euz goueled da vez don
En eur lared : « Kerzom du-hont, 'leh luh ar groaz ! »

Doue karantezuz ha leun a sklêrijenn,
Ouz da weled o tond, krog en dorn ma mamm gêz,
A vousc'hoarzo ouzit, hag a laro 'vel-henn :
« Deut, deut, eneou mad, deut d'am rouantelez,
Gand ma zent, ma zantezed ha gand am êled wenn ! »

Mad az-teus greet, ma zad, o vond diwar ar bed !
E-touez an dud atao 'mañ o ren ar brezel,
Ar gasoni, an droug : Doue 'zo ankouaet,
Ne garer 'med madou : o ! ya, gwell e' mervel,
Ha moned pell ahann, ma zad, 'leh ma'z out eet.

Pa vefom oll kousket 'n or beziou, er vered,
Neuze ne houlenfom mui a zroug d'on nesañ ;
Peuh a vo 'mesk an dud, greet oll 'vid 'n em gared :
Ha 'vid-se e weler er beredou, en hañv,
O tiwan bleuniou kaer ha pinvidig livet.

Ma zad, pa'z out degouezet 'tal dor ar baradoz,
Out bet degemeret gand da vreudeur vrezel
Euz ar *Gward-a-enor*, ar re⁴³ 'weles, en noz,
Aliez, dre da hun : ouz da weled a-bell,
'N-eus mousc'hoarzet ivez an Impalazer koz.

En bered ar barroz ema da vez, ma zad,
En-kichenn ma mamm ger, hag e-touez on zadou,
Tostig-mad d'an iliz : ahane 'klevi mad,
Bep sul, an overn-bred, ar han, ar pdennou,
Ar person koz 'gare gweled da zaoulagad.

Pep hini, o tremen, a laro eur bedenn
Evidout, ma zadig, hag a-raog mond en-dro
E vo klevet : « Bennoz Doue dit, ene gwenn

⁴³ ar re : "pere" er skrid orin.

Euz a Fañch an Uhel ! », rag gand oll dud ar vro
'Oas karet ha meulet, dreist-oll gand ar baourien⁴⁴ ! »

Keranborn, miz Mae 1861.

⁴⁴ ar baourien : ar beorien.

Deh hag hirie

Pa oan bihan, en Keranborn,
En ti ma zad, dindan e zorn,
Me 'oa evuruz ha laouen,
Netra ne ankenie ma fenn.

Neb poan-spered ha neb glahar,
Neb nehamant war an douar,
Med pa varve ma zurzunell,
Pe pa'h ee ma beuf da nijel.

Bremañ... bremañ eun amzer all !
An dud a zo peurvuia fall,
Nan eus er bed na peuh na mad,
'Med d'ar bugel, se 'zo anad.

A-boan eo c'hoaz d'am bleo louedañ,
Koulskoude, war-lerh pa zellan,
An oll dreo⁴⁵ a gavan troet
War an douar, ha gwaz deuet.

Gwechall, er goañv, e veze erh,
War ar menez, an douar kerh,
Euz an doenn 'veze gwelet
Dent Genver oh hirraad bepred ;

Ha beb noz, beb noz, goude koan,
'N em zatumem en korn an tan ?
Da zelaou kana gwerziou koz,
Komz euz lutuned ha traou-noz.

Goude an traou-noz, an Ankou
A ree dim euzi, a-weziou,
Eun nezerez, gand he mouez sklêr,
O trei he harr, eur plah seder,

A gane eur zonig kloareg,
Pe gwerz eur marheg kaloneg ;
Ar hloaregig 'skuille daero',
Ar marheg 'deue a-bell-bro.

Neuze, en hañv...o ! neuze 'vad...
Bervi a ra ma daoulagad,
Pa gomzan euz an amzer-ze,
An evurusa, marteze.

'Leh studia ha mond d'ar skol,
En liberte redeg dre-oll,
Dre ar hoajou, dre ar parkou,

⁴⁵ An oll dreo : an oll draou.

O klask bleuniou koant ha neiziou ;

'Liez diskabell, diarahenn,
Pigna war bep kleuz, peb gwezenn,
Lezel 'bep tu tamm ma dillad,
War al lanneg ha 'barz ar hoad ;

Mond da besketa, da neuial,
Laerez ivez meur a aval,
Gouren war ar foenn, er prajou,
Selled dorna war al leuriou ;

Bep sul, bep sul, an overenn,
Er gousperou, kan a-bouez-penn,
En iliz koz 'leh ma'z on bet
Gand person ma bro badezet ;

Leuriou nevez ha pardoniu,
Ar vombard hag ar biniou,
Hag an dañsou, beteg kuz-heol,
Ar mezhier mezuz ha diroll.

D'an abardaez, dre an hentchou,
Hag ar prajou, hag ar hoajou,
C'hoarz, kanaouennou, penn-da-benn,
Ha c'hwez-vad ar bleuniou spern-gwenn :

An traou-ze oll, em huñvreou,
A welan-me c'hoaz, a-weziou,
O tremant 'biou ma daoulagad,
Ha ma laka da huanad.

Neuze 'ouelan, 'vel eur bugel,
Hag e laran : « Gwell e' mervel
Eged chom pelloh war ar bed,
'Leh nan eus 'med droug ha morhed !

An heol-mañ n'e' ket an hini
« Wela gwezall⁴⁶ o lugerni,
N'e' ket ken tomm na ken seder,
Na ken lugernuz na ken sklêr :

Ar bleuniou n'int mui deread,
N'o-deus na liou kaer na c'hwez-vad.
Al lili n'int ket ken gwenn
Nag ivez ken ruz ar rozenn.

Beteg mouez an evnedigou
A gan el liorz, er hoajou,
A gavan zo trist-meurbed,

⁴⁶ gwezall : gwechall

Hag an eostig a zo raouet.

Hag an dud ? Oll int eet da fall,
Kenkoulz en Breiz 'vel en Bro-Hall,
Oll int troet gand an arhant,
N'eus ket daou vad war daou-hant !

Ne dañser mui, er pardonieu,
Ne gonter ken, en nozveziou,
En ilizou a zo leh frank,
Er hafe 'mañ an dud yaouank.

Pep hini 'venn komz en galleg,
Mez e-neus euz ar brezoneg,
Pep hini 'ra buhez diroll,
Allaz ! mond a ra Breiz da goll. »

Med ne ran-me ket eun daolenn
Re zu, heb enni nep tamm gwenn ?
N'eo ket 'balamour ma kozan,
'Komzan euz ma bro er giz-mañ ?

Dre n'on ken yaouank, marteze,
'Tamallan ma bro er giz-se,
Rag en neñv na war an douar,
Netra ne zo⁴⁷ troet, heb mar.

O Doue ! da vezo meulet,
Mar de' gaou kement 'm-eus laret,
Med huanadi a ran c'hoaz,
Hag e laran : Allaz ! Allaz !

Plouared, 1861.

⁴⁷ ne zo : fazi yezadur : n'eo

Ar ster vihan

Setu amañ eur ster heb ano hag heb brud,
N'eo ket anavezet a-bell, 'vel eur burzud.
Ha biskoaz, a gredan, biskoaz n'e' bet kanet
Gand eur barz euz a Vreiz pe en Bro-Hall ganet.

Koulskoude m'hen lavar, nag en Breiz nag en Gall,
'Leh am-eus baleet, n'em-eus gwelet eun all
A ve sklêrroh he dour ha gwelloh he dluzed,
Na muioh a vleuniou, en daou du d'an dour-red.

'Uz d'an dour sklêr a zo ha gwez derv ha gwez faou,
Bodennou gwern, haleg, kelvez karget a graou⁴⁸,
'Leh ma kan an evned, a-hed an deiz, soniou,
Hag ar gwezvoud c'hwez-vad a grap war ar skourrou.

Ar pesked a hoari en heol, 'barz an dour sklêr,
Ar helien livet-kaer a darnij 'uz d'ar ster,
Ar zaout hag an ohen a beur 'barz ar prajou,
An durzunell a gan, du-hont, 'barz ar hoajou.

Dirag zo mederien, er roz, o troha kerh,
O falz a luh en heol, hag an erv, war o lerh.
Em holo a damouez⁴⁹ : broudet gand ar helien
Ar zaout a glask disheol, a red hag a vreskenn.

A ! nag a blijadur am-eus bet dre amañ,
Pa oan c'hoaz yaouankig ! Neuze, evel bremañ,
'Karen redeg atao dre 'r parkou, ar hoajou,
Ha n'em-boa ket ma far evid kaoud neiziu.

Ken skañv hag eur gwiñver, war ar gwez e pignen,
Hag ar hoz mogerioù, diskabell, diarhen,
Diroget ma dillad, ha war-lerh ar pesked
E lammen 'barz an dour, siliou ha dluzed.

Ganen kanfarded all, e-leh moned d'ar skol,
Na da wech 'tremenen an deiz, beteg kuz-heol,
O pesketa amañ, o c'hoari, o neuial,
Hep kemer nehamant ebed gand netra all !

Na da wech, ma daou droad ganen e-barz an dour,
Aezet war eur roh, pe war ar hlazenn flour,
E chomen da beillad tro-dro eur wialenn,
Hag e kanen keit-se eur werz, eur ganaouenn.

O ! an oll zoñjou-ze a laka da dridal
Ma halon 'barz ma hreiz, ha bremañ 'vel gwezall

⁴⁸ graou : graoñ.

⁴⁹ Em holo a damouez : en em holo a damouez.

Az karan, ster vihan, ha dour sklêr, da vleuniou,
Da besked ken seder, ken koant 'n o hoariou.

Pep tar evel gwezall amañ a zo chomet,
Ar gwez a zo ken glaz, ken laouen an evned,
An durzunell a gan bepred a-uz d'he neiz,
Hag ar bleuniou 'zo koant, gante c'hwez-vad a-leiz.

Me hepken 'zo kozet : med felloud a ra din,
O ! ster goz, 'vel gwezall, 'barz da zour 'n em walhi,
Se a roy marteze (perag ne rofe ket ?)
Ha nerz ha levenez d'am horv ha d'am spered.

Plouared, an eil a viz Eost 1864.

Diskuizadenn

An heol a zo gwall domm, n'eus ket eur strill avel ;
Poultr 'zo leiz an hentchou ; dre-oll, 'barz ar parkou,
E welan mederien, en korv o rochedou,
Ha dornerien war leur a glevan du-hont pell.

Ar skrilled, en daou du, a gan war ar hleuziou,
Med an evned 'zo mud gand eun tommder ken braz ;
Nebleh eul lommig dour, nebleh eur vougenn hlaz,
'Vid diskuizañ eun tamm. Peleh 'kan ar goukou' ?

Doae da vo meulet ! Setu du-hont eur hoad,
Ha drezañ e tremen zoken ar wenodenn !...
A ! gourvezom amañ eun tamm, war ar hlazenn,
'Uz d'am fenn, en dervenn, 'pign ar gwezvoud c'hwez-vad.

Amañ e' brao beza ! War lein eur roz ez on,
Goloet a gelvez, faou ha dero uhel ;
Izelloh, er raden, 'zo pikoliou rehell,
Hag en traoñ, 'uz d'an dour, 'kan laouen eur gudon.

An dud koz a lavar, dindan ar rehell-ze,
Gwechall 'veze gwelet gwrahed, kornandoned ;
Hag an dud ouizieg 'lar 'oa fier an Drouized ;
Meur a zen, 'n skeud al loar, o gwel c'hoaz, marteze.

Amañ e' brao bezañ, hag en skeud an dero
Diskuizañ hag ober a bep seurt huñvreou,
Ha selled an ohen o peuri, er prajou...
Med pell em-eus da vond... War-zav, baleer bro !...

Pluned, d'an 9 a viz Eost 1864.

War hentchou Breiz-Izel

Setu-me o tremen dre eur parkad ed-du :
An heol 'zo lugernuz, hag an oabl glaz ha sklêr ;
Malvennigou-Doue ha gwenan, a bep tu,
A glask mel ar bleuniou, o tarnijal, seder.

'Barz ar faou hag an derv, 'kan an evnedigou,
Hag eeun war-du an neñv, e sav an alhweder ;
Ha me, evel mezevet gand c'hwez-vad ar bleuniou
Ha richan an evned, ken drant, ken dibreder,

A chom en-kreiz ar park, ha kalz a zoñjou kaer
'Deu da leunia ma fenn, huñvreou yaouankiz,
Huñvreou karantez hag a nevez-amzer...
Skeudou kaer d'am halon, a zistro war o hiz.

Med an heol 'zo ken tomm ! Red e' mond gand ma hent.
Hag ez an, ma fenn leun a hwez-vad, a zoñjou,
Da glask dre 'r parroziou kantikou koz ar zent
A vevas en on bro, ha gwerziou, ha soniou.

Ha kement sell gizioù an dud koz a wezall,
Ar re⁵⁰ a gousk bremañ en peuh en o beziou.
D'an dud diwar ar mêz 'komzan, nann en yez hall,
Mez er yez venniget 'gomzer en or mêziou :

Hag e kanont oll din, re yaouank ha re goz,
Al labourer, er park, hag an nezerezed,
O neza war o harr, hag en deiz hag en noz,
El lann pe er menez, ar mesaer deñved.

Aliez e kavan, o vond dre an hentchou,
Eur paour klasker-bara ; en disheol eur faouenn
Pe eur goz gwezenn derv, 'vid kleved e gontou,
Eh azezom neuze, on-daou, war ar hlazenn.

Me 'skriv war ar paper an oll gontou-ze,
'Vid na vint ket kollet, ma vint kontet bepred,
Pa vefom-ni oll marv, rah hep se, marteze,
On bugale n' ganfent 'med soniou Gallaoued.

Hag er goañv, aliez, 'barz ar hêriou Bro-Hall,
Ma-unan, 'tal ma'z an, 'soñjan en deveziou
Am-eus bet tremenet o klask traou koz gwezall,
Gwerziou, soniou, kontou, hag ar *misteriou*.

Hag e kred din kleve mouez ar paotrig deñved
O kanañ, er menez ; ha c'hwez-vad ar spern-gwenn
Hag ar parkou ed-du⁵¹, ha richen an evned,

⁵⁰ Ar re : "Pere" er skrid orin.

O tond em hambr, a garg ma halon ha ma fenn !

*Etre Menez-Bre ha chapel Sant-Alar, en-kreiz eur parkad ed-du,
an deiz kentañ a viz Gwengolo 1868.*

⁵¹ ar parkou ed-du : fazi : ar parkadou ed-du.

Otel vraz ar steredenn en menezioù Arre.

« Kousked en eun ostaleri,
Ha zoken, hep klemm hag hep kri,
En otel vraz ar steredenn,
'Zo eur blijadur a garfen. »

Evel-se am-eus bet skrivet
Eun tu bennag ; ne zoñjen ket
Neuze e vije degouezet
Kement-se ganen ken abred.

Ha setu an dra c'hoarvezet ;
En eur park segal⁵² 'm-eus kousket,
E-touez ar brug hag ar raden,
En otel vraz ar steredenn.

Ma baz em dron, ez oan en-dro,
O klask a bep tu dre ar vro
Gwerzioù ar bobl hag he sonioù
Ha kaozioù koz an nozveziou.

An heol a oa bet tomm-meurbed,
Ne gaven ti na den ebed ;
En Kerne e oa kement-mañ,
Er menezioù : c'hwi 'gred bremañ ?

Skuiz-kaer, hag a boultr goloet,
Euz an hent mad 'oan distroet...
P'erruis 'leh 'oan en gortoz
Da loja, 'oa unneg eur noz.

Me da skoi neuze war eun nor,
Ha da houlenn, buan, digor :
« Petra 'glaskit ? », 'laras eur vouez.
« Gwele 'vid an noz, ma den kêz. »

« It, ha ma lezit da gousked,
D'ar houlz-mañ 'n noz n' zigoran ket. »
Ha me da skoi war eun nor all,
Ha da ober d'ar hoad strakal.

« Piou 'sko er giz-se war ma dor ? »
A laras eur vouez en fulor.
« Ma den mad, digorit, m'ho ped,
Naon am-eus ha skuiz on meurbed. »

« It gand ar foeltr, ha ma lezet⁵³,

⁵² eur park segal : fazi : eur parkad segal.

⁵³ lezet : lezit.

'Vid en ti-mañ ne deufet ket. »
« Ha peleh eta mond neuze,
Mar oh oll amañ ker mad-se ? »

Ha me da zorna koad neuze,
Ha da skei amañ ha du-ze
War an oll dorjoug ; dao ! dao !!
Ha d'ober, kredit, eun trouz brao.

Ar bourk oll a zone ganin,
Med foletr dor ne zigore din.
Darn a doue, darn 'hourdrouze...
Ha me o vond kuit neuze.

Ar bourk fall-ze a zo anvet...
Nann, e ano ne larin ket,
En Breiz-Izel 'vid unan fall,
'Zo re vad kement hag en Gall.

Ha neuze, 'vid beza kousket
Eun noz er-mêz, n'on ket marvet,
Ha diwezatoh, marteze,
Gand plijadur 'soñjin en se.

An noz a oa kaer ha klouar,
Leun a hwez-vad 'oa an douar,
An oabl oll 'oa steredennet,
Ar skrill a gane 'touez an ed.

Nebeud avad am-eus kousket ;
E-pad an noz 'm-eus huñvreet,
Am-eus greet bep seurt huñvreou,
Ha gwelet a bep seurt skeudou.

Med setu eun tammig sklêrder
Er sav-heol, hag an alhweder
A zihun hag a gan laouen,
Hag a zav eeun a-uz d'am fenn.

Ar goukoug hag ar richodenn
A respont, hag en peb gwezenn
E klevan moualh ha drask prestig,
Ha piñsin, ha laouenanig.

Setu kan a richan dre-oll,
Hag eur muzik koant ha diroll ;
Peb evn a gan e ganaouenn,
A ra da Zoue e bedenn.

Ha me a chom pell d'o zelaou,
Evel chalmet, heb lared gaou,
Ha pelloh n'em glemman ket

Da vezen en eur park kousket.

Med setu an heol benniget
A darz ruz, ha kaer da weled !
Neuze e kemeran ma baz,
Ha war an hent e laran c'hoaz :

« Kousked en eun ostaleri,
Ha zoken, hep klemm hag hep kri,
En otel vraz ar steredenn,
Eur blijadur, en miz Even ! »

En menezioù Arre, d'an 11 a viz Even 1870.

War hentchou Breiz-Izel

I

Setu-me a-nevez war hentchou Breiz-Izel
O klask evel gwechall, gwerz, son ha rimadell,
Ha kontou burzuduz ar bobl a'n amzer goz,
Plijadur an tiad, e-tal an tan, en noz.

Deh em-eus bet⁵⁴ gwelet Treboull, Douarnenez,
Poull David, 'leh ma oe beuzet ar zerh Ahez,
Merh ar roue Grallon, ha pelloh eun tammig,
Poull dregad, bro an den kaloneg Ar Houedig.

Ha setu-me bremañ war hent braz Lokronan.
Skrill ha laboused-nij, alhweder, laouenan,
Moualh, ha drask, ha koukoug a gan ken dudiuz !
An amzer a zo tomm, hag an heol lugernuz.

Tremen a ra kirri, gand gwazed bragou-braz,
O vond gand koad en kêr, merhed korvennou glaz,
Tavañjer varellet, podou lêz⁵⁵ war o fenn,
Skañv a droad ha yah-mad, hag oll ez int laouen.

En daou du euz an hent 'zo ed kaer er parkou,
Bleun c'hwez-vad er spern-gwenn, hag er gwez-avalou :
Meuleudi da Zoue ! an esot a vezo kaer,
Ha da boan 'vo paeet, hebdale, labourer.

Setu, war lez an hent, setu eur chapel goant,
Gand tour uhel ha skañv : mond e-barz am-eus c'hoant.
Chapel Gerlaz ez eo, eun dreo a Blonevez,
Nan eus netra enni da weled 'med daou vez ;

Unan, bez eur person, eun all, bez eun aotro' ;
Tremen daou-hant vloaz 'zo abaoe m'int maro.
Koulskoude setu c'hoaz hag a zo da zelled,

⁵⁴ Deh em-eus bet deh em-oa bet...

⁵⁵ podou lêz : podadou lêz.

Amañ, 'n eur horn kuzet, a-dreñv dor ar porched :

Eur manah koz en mên, baz en e zorn, barveg,
Hag e zorn all war skoaz eur plouezant⁵⁶ bleveg :
Ar plouezant a zalh, gand eur gordenn staget,
Eur bleiz braz, an hini⁵⁷ a zo e zent skrignet.

Ar manah barveg-se, 'vel ma ouzoh ervad,
E' 'n aotrou Sant Herve : eur bleiz braz euz ar hoad
A zebras e azen : ar sant 'lakaas ar bleiz
D'ober dezañ labour an azen, noz ha deiz.

Eom adarre en hent : setu bugaligou,
Seder ha koantig oll, paotrigou, plahigou⁵⁸,
O vond d'ar skol, gorreg, hag a-hed an hentchou,
O c'hoari, o kanañ hag o klask an neiziou.

It d'ar skol, bugale, rag an deskadurez
A zo gwelloh d'an den 'ged ar binvidigez :
« Gwell eo deski mabig bihan
« Eged dastum madou dezañ. »

Evel-se 'komz furnez on zadou koz gwezall,
Hag an ali 'gredan penaoz n'eo ket fall,
Rag mar deo eun tammig c'hwero ar grizienn⁵⁹,
Hervez lavar an oll, mad-tre eo ar vouedenn.

Kana 'ra ar skilled, an heol 'zo lugernuz,
An oabl 'zo glaz ha sklêr, an hent a zo poultruz,
Ha war vordig an hent, en disheol eur wezenn,
E chomen da skriva ha da zeha ma hwezenn.

Mez setu ma welan begig tour Plonevez,
Ar hog koueor o selled dreist ar gwez, ar menez :
Eno e tiskuizin hag e tebrin eun tamm,
A-raog moned adarre en hent, a-nevez flamm.

II

« An tamm hag al lomm
A zalh an den 'n e blomm. »

Debret, evet am-eus : emaon adarre en hent
Etrezeg Lokronan, ken diskuiz evel kent.

An heol n'e' ket ken tomm ; brao e' bale bremañ !
Kurun am-eus klevet : glao a vo, a gredan ;
Glebiet 'vin, marteze, mez ar glao 'raio vad
D'an ed, 'barz ar parkou, ha d'ar prad, ha d'ar hoad.

⁵⁶ plouezant : ploueziad.

⁵⁷ an hini : "pehini" er skrid orin.

⁵⁸ paotrigou, plahigou : An Uhel ne oar ket ober liester ar gerioù bihannad.

⁵⁹ ar grizienn : ? Ar pezh a zo kriz.

En Plonevez ez oa eun eured pinvidig
Labourerien-douar. 'Vel ma oa birvidig
Lagad ar merhedou, hag ivez ar baotred
Gand son ar biniou hag ar vombard kevred !

Doue ! an dillad kaer hag ar braoeriu
A lugerne en heol, evel melezeriu !
Koefou dantelezet, kroaziu aour hag arhant,
Ha broziou ruz-skarlat : Doue, ar plahed koant !

Allaz ! an dillad-se 'vo dilezet, eun deiz,
Hebdale, em-eus aon : neuze bugale Vreiz
A vezo dihizet hag evel eur bobl all,
P'o-devo kemeret langaj ha daillad gall.

Evel bugale vad, a zastum relegou
O herent tremenet, o zud koz, o zadou,
Dastumom-ni ivez, 'raog 'vo re ziwevad,
Giziu on zadou koz, o zoniou, o dillad.

Dastumom ar hontou a zo gante deuet
Euz ar broiu pell-ze leh kentañ int ganet,
E-leh ma sao an heol, beteg on bro Arvor,
Rehell ha koad 'n he hreiz, hag en-dro dezi mor.

Ya, yez on zadou, o gwerziou, o zoniou,
O hontou burzuduz, o dillad, o giziu,
O hredenn en traou koz, setu oll Breiz-Izel,
Setu ivez perag he-deus stourmet ken pell.

Mez adveva 'raio eta eur vuhez nevez,
Ha ne dalv ket dim stourm : an traou-ze 'zo hervez
Al lezenn naturel. An heol a guz bemdeiz⁶⁰,
Bemdez e sao an heol : bezom 'ta leun a feiz.

Saludom gand respet an heol koz 'zo kuzet ;
Saludom gand fiziañs an heol nevez savet :
Sellom, nann war o lerh, hogen a-raog deom ;
An heol a luh d'an oll : kalon 'ta, ha kerzom !..

War an hent etre Douarnenez ha Lokronan, d'ar 26 a viz Mae 1884.

⁶⁰ bemdeiz : bemdez.

Keranborn

Setu-me bremañ koz, nao ha tri-ugent vloaz,
Hag em-eus c'hoantaet doned da weled c'hoaz
An ti 'leh on ganet, e barkou, e goajou,
Ha klask enne ar skeud euz ma henta deiziou.

Salud it, Keranborn ! Ma halon da dridal,
Kerkent ha ma tostaan, a 'n em laka raktal,
Hag ar soñjou gwezall a zao founnuz em penn,
Ha ma huñvreou kaer, 'vel an deliou er wenn⁶¹.

Pa oan c'hoaz bihanig, amañ em-eus gwelet
Moger goz ar porz kloz, hag he dor houarnet ;
Amañ an dourell vraz hag ar galeriou,
'Leh e veze laret e veze spontailhou.

Setu an oaled vraz ; aze, kador ma zad.
Beb noz, e-pad ar goañv, 'veze greet eun tantad :
Ar vevelien en-dro 'deue da vutunad,
Da gomz euz o labour, o sehañ o dillad.

Rag e tro 'pad an deiz, dindan ar glao, an erh,
O-devoa labouret douar gwiniz ha kerh ;
Nerz an tan 'zigropo neuze, a-nebeudou,
An izili skornet, hag ivez an teodou.

Hag e veze kontet euz labour an douar,
Euz ar hezeg, ar zaout, ar stered hag al loar :
Al Lanneg-Vraz aoa gwall-ziêz da arad ;
Ar vuoh griz 'oa halet ; Maojis 'oa eur marh mad.

Ar mitizien 'veze a-dreñv, en traoñ an ti,
Aezet da nezañ en-kichenn o hirri.
A-grezi-toud e kane unan, gand eur vouez sklêr,
Eur werz gwall druezuz, pe eur zonig seder.

Ha neuze ar wazed kerkent a dave mik,
Evid selaou ervad ar werz pe ar zonig.
En hini⁶² eur hloareg a gan dim e hlahar
Da veza dilezet gand an hini a gar.

Aliez 'tegoueze, goude an noz serret,
Eur paour baleer-bro, da houl' beza lojet,
Distrempet gand ar glao, e ilzili skornet,
Skuiz, ha naon dezañ, deuet euz an Argoad.

Ha p'en-dije koaniet, e tostae d'an tan,
Ha degemeret mad ganim, braz ha bihan,

⁶¹ er wenn : notenn gand an oberour : gweenn (Tregerieg), gwezenn.

⁶² En hini : " En pehini " er skrid orin.

Hag e kane neuze ha gwerziou ha soniou,
Hag e konte kontou, ha bep seurt marvaillou.

Ha me, en korn an tan, war eur skaon azezet,
A zelaoue, sioul-mad, souezet pe spontet...
E-keit-se, erh, avel, dent Genver ouz an ti,
Eun amzer na vije ket lakaet er-mêz eur hi.

A-weziou all, 'teue Garandel, an dall koz,
Hag e veze miret e-pad teir, peder noz⁶³,
Rag n'en-doa ket e bar evid konta kontjou,
Hag ivez 'vid kana gwerziou koz, soniou.

An oll hen selaoue, beteg ar hi, chalmet ;
Me 'eve e gomzou, ha noz-deiz ma spered
'Oa leun a varvaillou ha gwerziou Garandel.
'Allaz ! an amzer-ze a zo bremañ pell, pell...).

Hag em-eus c'hoantaet, a-raog ha ma teufont
Da vervel, 'vel pep tra, (rag mervel a rafont) ;
O dastum a henou an dud simpl, ar baourien,
Na gomzont ket galleg, ha na ouzont ket lenn.

Kontadennoù gwezall, plijadur on zud koz,
Me ho kar dreist pep tra, me 'ro deoh ma bennoz,
Rag c'hwi 'h-eus konsolet, a beb amzer, ar paour,
En e di pri ha plouz ; c'hwi 'zo gwell 'ged an aour !

Lezom bremañ an ti, gwelom al liorzou,
Ar parkou, ar prajou hag ivez ar hoajou :
Gwelom ha me 'gavo hag anvezo bepred
Ar gwez koz, hag ar re e-neus ma zad plantet.

Dero, kistin ha faou, ma zad 'blante dalhmad ;
Setu amañ eur hoad plantet oll gand ma zad.
Braz ha ker int bremañ, uhel 'savont o fenn,
Ha deuz eur barr-avel n'o-deveus ken aouenn⁶⁴.

Mall 'm-eus da weled oll : setu al liorzou,
'Leh ma kare ma mamm difoenna he bleuniou
Hag an ale lavand 'leh reden war-lerh
Ar malvennoù-Doue, hag e ruillen ma hlerh⁶⁵.

Ha setu ar gwez-per, setu ar gwez-kerez,
Hag ar gwez-avalou, hag ivez ar pechez
Am lakae evuruz : ar gwez a zo kozet,
Hag ar yeot fall dre-oll bremañ 'zo diwanet.

⁶³ noz : nozvez.

⁶⁴ aouenn : aon.

⁶⁵ ma hlerh : ma helh (notenn gand an oberour).

Deiz mad dit, rozennig, am-boa kat⁶⁶ 'touez an drez,
Ha trañsplantet aze ; koant out, en gwirionez.
O soñjal az-poa riou, en noz, ne gousken ket,
Hag a ris tregont leo evdi dond d'az kweled.

Setu ar wdenodenn dre beleh 'oan douget
Da iliz Plouared, 'vid beza badezet,
A-dreuz ar parkou ed⁶⁷, pradou leun a vleuniou,
Ha koajou, 'leh 'kane an evned o zoniou.

Ha setu ar werneg 'leh ma kavis eun deiz
(Pebez da blijadur !) eun durzunell 'n he neiz,
An heol a oa izel, prest da vond da gousked,
Hag an neiz a luhe 'vel eun neiz alaouret.

Biskoaz, abaoe, brasoh plijadur n'em-eus bet,
Setu ar chapel goz 'leh 'neize ar haouenned ;
Setu amañ ar prad 'leh e karen gouren
Gand ar vesaerien, e-pad amzer ar foenn.

Amañ, 'barz ar hrañj vraz, e veze eul lutin⁶⁸,
'Veze gwelet 'weziou, ha klevet o c'hoarzin.
Ha pa oan bihanig, pa ne vezen ket fur,
E veze laret din : « Gand al lutin 'h i sur. »

Setu ar feunteun goz 'leh e veze laret
E oa, en teir billig, eun teñzor braz kuzet,
Ha war an teñzor-ze, rodellet eur serpant,
Ha dour ar feunteun-ze en-doa blaz an arhant.

Setu ar hoad kistin 'leh e teuen da lenn,
Ha 'leh em-eus skrivet ouspenn eur gaanouenn.
Allaz ! darn euz ar hoad a zo bet diskaret,
Ne gavan ken bremañ meur a wezenn garet !

Keus braz em-eus deze, 'vel da goz mignoned,
Abaoe ma oan bugel, anavezet ha karet ;
Ouz pep hini aneze e oa eur zoñj staget,
Hag o gwelen gand joa ha plijadur bepred.

Kenavo , Kerarborn⁶⁹ ! Aliez ma spered
A vez ganit, pa vez ma horv leh all dalhet.
Kozet ez on, 'veldout, ha ma bleo a zo gwenn :
Kent mervel, 'm-eus c'hoantaet sevel dit kanaouenn.

Eur gontadenn, eur zon 'zo, m'hen goar, traou dister,
Koulskoude, a-weziou, kreñvoh 'vid an amzer ;
Eur gontadennn kontet gand an dall Garandel

⁶⁶ kat : kavet.

⁶⁷ ar parkou ed : ar parkadou ed.


⁶⁸ lutin : lutun.

⁶⁹ Kerarborn : bet skrivet evel-se er skrid orin.

A zo kant gwez⁷⁰ kosoh 'vid ar hosa kestell !

Te a bado bepred ; me a ranko mervel,
Evel eun delienn zeh, skubet gand an avel ;
Te a welo tud all, amzeriou mad ha fall ;
Doue d'o bennigo : me 'vo eet d'eur Vreiz all.

Plouared, d'an 13 a viz Gwengolo 1890.



⁷⁰ gwez : gwech.

Yann Kerglogor

Ar haner baleer-bro

D'am mignon Ernest Renan

I

Ar haner koz baleer bro
Eh a dre ar mêziou en-dro,
Pe ve an amzer kaer pe fall,
Hag en e zorn e vaz gargal.

Diroget ez e' e zillad,
En e dreid eur botou-koad,
E varo a zo hir ha gwenn,
Hag ivez e vleo, war e benn.

War e benn a zo eun tok plouz,
Ha war e gein eur zah ler rouz.
Miret abaoe an amzer gaer
'Oa soudard d'an Impalaer.

An hini braz, Napoleon,
En-devoa kalon eul leon,
Hag en-devoa heuliet pell, pell,
Bepred en tan hag en brezel.

Ha c'hoaz e verve e lagad,
Ar soudard koz, ar soudard mad,
Hag e krie : « Viv' l'Empereur ! »
Pa gomzed euz e gann-vreudeur⁷¹.

E ano 'oa Yann Kerglogor,
Ha dalhet mad em-eus eñvor
Euz anezañ, euz e werziou,
E gontou⁷² leun a vurzudou.

Pa veze an douar skornet,
Ar parkou a erh goloet,
E tegoueze Kerglogor goz
Er maner, da abardaez-noz.

Ha pa veze gwelet du-hont,
En penn an ale vraz o tond,
Ar vugale 'grie 'n eur vouez,
(Me ma-unan 'oa en o zouez).

« Setu o tond Yann Kerglogor ! »

⁷¹ e gann-vreudeur : e vreudeur er hann, er brezel.

⁷² E gontou : e gontadennou.

Hag e redem da doull an nor
Da zegemer ar haner mad,
Da zougen dezañ e zahad.
Neuze Kerglogor, e benn noaz,
A ree da genta sin ar groaz,
Hag en e zorn gantañ e dog,
E lare, kent moned a-raog :

« Kement 'zo en ti, Doue d'o miro ;
Kement 'zo er-mêz, Doue d'o honduo ;
Kement a dleom pedenni evito,
Doue d'o delivro⁷³ ! »

« Roit ho paz ha ho sah ler,
Yann goz ; gwall rust e' an amzer ;
Deut da domma e-tal an tan,
Da hortoz ma vo aozet koan. »

Hag a-neuze ma daoulagad
War e zah ler 'veze dalhmad,
Rag eno e oa teñzoriou
A daolennou⁷⁴, gwerziou, soniou.

Goude koan hag ar pedennou
'Veze tennet an taolennou
Euz ar zah ler, neuze kerkent :
Or Zalver, ar Werhez, ar zent.

Hag eskibien, hag ebestel,
Hag a bep seurt tud a vrezel,
Oll livet koant ha reñket mad,
Plijadurez on daoulagad.

Hag an den koz a gomze stard,
'Vel eru jeneral d'eur soudard,
Hag e houneze ar viktoar,
Karget a enor hag a hloar.

Neuze, 'kane dim buheziou
Sent koz Breiz⁷⁵, o burzudou :
Sant Eflamm, santez Enori,
Sant Tual, sant Goneri.

Ha sant Erwan, mignon ar paour,
E garantez gwelloh 'ged aour,
Ha sant Herve, ar haner dall,
Sant Kireg, ha kalz a re all ;

Sant Weltaz, patron ar chas klañv,

⁷³ Doue d'o delivro : Notenn gand an oberour : Setu aze gwir gomzou ar haner koz a-raog mond tre en ti.

⁷⁴ A daolennou : a skeudennou.

⁷⁵ Sent koz Breiz : "Ar zent koz Breiz" a zo bet skrivet gand Luzel.

Sant Tudi ha sant Laouenan,
Sant Herbod, 'ra sevel dienn,
Sant Gwenole ha santez Gwenn ;
Sant Jili ivez, gand e had,
Sant Tegonneg, 'ra charread
Oll vein e di gand eur bleiz loued,
En-devoa e azen drebert.

Kalz c'hoaz a re all, rag sent Vreiz
'Zo dre-oll aneze a-leiz,
Ha 'vid pep kleñved ha pep poan
Ar horv, ar spered, 'zo unan.

Goude ar revu⁷⁶ tremenet
Hag ar buheziou kaer kanet :
« Kerglogor, c'hoaz eur gontadenn,
Da ober c'hoarzin, pe aouenn⁷⁷ :

Jeanted ha kornandoned,
Ha tud bet troet en loened,
Majisianed, sorserien ;
Tud-vleiz, dragoned a zeiz penn⁷⁸ ;

Priñsed ha priñsezed feyet⁷⁹,
En eur hastell en êr dalhet,
En eur ger, an oll burzudou
A laka ar bobl 'n he hontou⁸⁰. »

II

Neuze, eur hef-tan en e zorn,
Kerglogor a dane e gorn ;
An oll en-dro a dave mik,
Ha goude menna⁸¹ eun tammig :

« Selaouit oll, mar hoh-eus c'hoant,
Hag e klevfot eur gaozig koant,
Ha nan-eus⁸² enni netar gaou,
Mez, marteze, eur ger pe daou. »

Eur skudellad jistr 'n e gichenn,
Evid distaga e lañchenn,
Aezet war eur skabell goad,
En korn an tan, ar honter mad

Distaget neuze, penn-da-benn,

⁷⁶ revu : galleg (gwelloc'h eo galleg Luzel eged e vrezoneg).

⁷⁷ aouenn : aon (evid ar rim ?)

⁷⁸ dragoned a zeiz penn : galleg : Dragoned o zeiz penn.

⁷⁹ feyet : achantet.

⁸⁰ e gontou : e gontadennoù.

⁸¹ menna : en em zoñjal.

⁸² nan-eus : Tregerieg : n'ez eus.

Eur gaoz d'ober c'hoarz pe aouenn⁸³.
Setu amañ, en berr-gomzou,
Unan euz e gaerra kontou⁸⁴.

Eur Roue koz, klañv, trist-meurbed,
Hag e oll izili skornet,
E zaoulagad leun a zaerou,
Hag e galon leun a gañvou,

A hirvoud gand keuz d'e halloud :
D'e yaouankiz, eet en o roud ;
Doktored, majisianed
N'hellont rei dezañ ar yhed.

Hag eun den koz a lar neuze,
Eun den a gant vloaz, marteze :
« N'eus 'med Evnig ar Wirionez
'Ve gouest da yac'haad ar rouez⁸⁵ !

Eur zell hepken hag eru zonig
Euz al labous-se ken koantig
A ziskar glahar ha kleñved,
A ro yaouankiz ha yhed. »

Ar Roue koz a lar neuze :
« Red e' din kaoud al labous-se !
D'an hini hen kavo, ma merh,
Ma muia-garet, koant ha gwerh ! »

Ha setu a-neuze kerkent
Tud a beb rumm da vodn en hent,
Ha priñsed, ha jeneraled,
Labourerien, artizaned.

Mez allaz ! nikun ne zistro,
Rag oll e kavent ar maro ;
Hag ar Roue 'zo klañv bepred,
Hag an oll a zo glaharet.

Neuze, eur mesaer bihan
Euz eun ti-plouz a-dreñv al lann,
Melen e vleo, lemm e lagad,
Eh a ivez, ar paotri mad,

Evdi sikour e gerent paour,
A gare dreist arhant hag aour.
Kimiadi 'ra ezuz ar Roue,
Ha mond neuze, en gras Doue.

⁸³ aouenn : aon.

⁸⁴ kontou : kontadennou.

⁸⁵ ar rouez : ar rouanez.

E dad 'ro dezañ pemp gweneg,
Hag e vazig dero peneg :
E vamm 'ro eun dousenn grampouez,
Ha c'hweh vi poaz, euz he folez.

Bale a ra, bale a ra...
Kaloneg, heb aon a netra ;
Aliez e tremen an noz
En eur park, pe eur gleuzenn goz.

Eun deiz, e-pad m'oa azezet
E-tal eur feunteunig kuzet
Dindan eur vodennig gwern glaz,
Poultret oll hag ivez skuiz-braz,

Da zebri eun tamm bara du,
Eva dour, mond adarre dioustu,
Setu o tond eur verienenn,
Eur big hag eul louarn lost gwenn ;

Hag e houlenjont peb a damm.
N'en-doa ken euz krampouez e vamm
Nemed unan, ha he rannas
Gand an tri loen, hag e laras :

« Loenedigou Doue, dalit
Lod euz ar pez am-eus ; debrit,
Rag naon hoh-eus, war a welan,
Ha seblant zoken beza klañv. »

« Trugarez ! laras al loened,
Pe nemedout 'vijem marvet
Gand ar gwall naon ; pa vi nehet,
Goulenn, hag e vi sikouret. »

« Hag a zo mad, hag a zo kaer ! »
'Laras neuze ar mesaer.
Ha da vond en hent a-nevez
Da glask Evnig ar Wirionez.

Muioh kaloneg 'oa bremañ,
O weled 'oa a-du gantañ
Loened keiz an Aotrou Doue,
Hag e soñje : "Mar ben Roue !..."

En eur ger, evid diverrañ,
Rag hir a-walh e' ar gaoz-mañ,
Goude kalz a boan, a labour,
Daoust d'an heol, d'ar skorn ha d'an dour,

Sikouret gand an tri loen mad,
A deue, p'o galve, timad,

Hag hen tenne a bep pleg fall,
Hag hen mire euz a beb gwall,

E teuas a-benn, evuruz,
Da dapoud al loen burzuduz,
Ha d'hen degas 'n e gaoued aour,
D'ar Roue koz, ar monark paour.

Ar Roue, kerkent m'hen gwelas
A zavas e benn, a hoarzas,
Ha pa hen klevas o kanañ,
'N em lakaas da ganañ gantañ.

Ha setu-hañ leun a yehed,
Laouen hag evuruz-meurbed.
Ar mesaer, ar zun war-lerh,
'Eureujas ar briñsez e verh.

Hag e-pad eur miz⁸⁶ penn-da-benn,
E oe festou, goueliou laouen.
Koulz d'ar paour 'vel d'ar pinvidig,
'N eur ger, eun eured magnifik.

Ma zad-koz a oa keginer,
Ha me a oa o trei ar ber,
Em-boa bet eun tamm, eur bannah,
Hag on deut amañ d'gonta dah⁸⁷.

III

Me 'zelaoue ar honter mad,
Sioul, ha warnañ ma daoulagad,
Ha 'pad an noz, e varvaillou
A welen c'hoaz em huñvreou.

Ha bremañ, pa'z on deuet koz,
E soñjan c'hoaz enne, beb noz,
En gwele, pa ne gouskan ket,
Gand keuz d'an amzer dremenet.

Hag em-eus bet lakaet em penn,
Kent ma vefont marv da viken,
Dastum ar gwerziou, ar hontou,
Oll blijadurez on zadou,

A gaver c'hoaz, miret en penn
Ar re n'ouzont skriva na lenn,
War ar mêziou, en tier plouz,
'Leh 'vev tud simpl, pell euz an trouz.

E-pad tregont vloaz, pe war-dro,

⁸⁶ e-pad eur miz : eur mizvez.

⁸⁷ dah : deoh.

Em-eus o hlasket dre ar vro,
Hag emaint bremañ em levriou
'Leh e vevfont hir amzeriou.

O hontou koz, gwerziou, soniou,
A chalm tud Vreiz, 'n o nozveziou,
Magadurez skiant ar paour,
C'hwi 'zo kant gwech gwell 'vid an aour !

Nag a boaniou 'h-eus konsolet,
Poaniou ar horv pe ar spered !
Kontou burzuduz on zud koz,
Warnoh e roan ma bennoz !

Plouared, d'an 17 - 20 a viz Gwengolo 1891.

